



Embannet gant Skoazell  
Kuzul Departamant Penn ar Bed  
Kuzul Rannvro Breizh



© Keit Vimp Bev – Laurence Lavrand  
Skeudennoù : Nathalie Almange  
Kempennet gant Mich Beyer  
© Tous droits réservés – Pep gwir miret strizh  
ISBN 978-2-86824-326-3  
ISSN : 2552-3546

Laurence Lavrand

**Kouignoù iskis  
evit ar  
mammoù-kozh**



2019

## **Tudennoù pennañ :**

Krennardezed : (12-13) Loeiza, Annwenn,  
Nakchami, Fanny

Maouezed kozh : Helen, Suzon

Tud Loeiza : Pierre, Marie, (Véronique)

Fouad (22) hag e c'hoar Mounissa (17)  
eus Mayotte, Alban ha Toni eus Brest

Ensellerien : Ronan Henaff, Paol Cervione

– Lezit ac’hanon da vont alemañ ! a huchas Loeiza en ur skeiñ par ma c’helle ouzh an nor stlapet dezhi dirak he fri.

En aner. Klevout a reas ar c’hammedoù o pellaat. Pelloc’h, a-us dezhi, trouz un nor all, ha neuze an didrouz. Ober a reas hanter-dro, diskenn teir fazenn ha sellout en-dro dezhi. Divent e oa ar pezh a oa da welout. Lâret ‘vefe bet sal gozh ur patronaj, mogerioù brik ha leur betoñs gris. En nec’h-tre, un doare tarzhell-gav, ur skleur dister o tont drezi, met pevar metr bennak a uhelder marteze, koulz lâret dreist diraez.

Ne oa nemet peder c’hador houarn. Unan a oa war dri zroad, unan all faoutet an azezenn anezhi, ne vije ket padet dindan unan bennak pignet war-c’horre. Setu ne chome met div e ratre vat. Azezañ a reas Loeiza war an hini dostañ. Sellout a reas ouzh an eur war he montr. tost da c’hwec’h eur noz. Prestik e vefe he zad er gêr. Souezhet e vefe pa ne gavfe ket anezhi, rak ne oa ket aotreet ken da ruzañ ur wech echuet ar c’hentelioù.

N'he doa ket aon er pezh teñval. En em voazañ a rae he daoulagad tamm-ha-tamm. Kaer he doa klask, ne gomprenne ket perak e oa bet degaset aze gant an den-se. O stlejañ he marc'h-houarn e oa, trankil, peogwir e oa aet war un tamm gwer bennak. Kement a vez anezho, e penn kentañ ar sizhun, test ma vez ar gwaskedoù-bus hag ar pannelloù bruderezh eus kounnar an dibennoù-sizhun ! Ha perak ne vez ket graet gant pleksiglas ? a soñje-hi pa wele ar freuz, ingal hag ingal.

Ur wech degouezhet e liorz-h-kêr Choquet de Lindu e oa kroget da c'hweziñ dre forzh stlejañ he belo a-hed er grec'henn. Chom 'rae c'hoazh ganti ouzhpenn an hanter eus ar grec'henn villiget-se a gas betek plasenn Keruscun ha ru Sant-Mark pelloc'h. A-boan torchet ganti an dour-c'hwez a-ziwar he zal, e oa tardet un oto dirazi, hag ur gwaz er-maez da lammat warni. Ken buan e oa aet an traoù ma n'he doa ket bet tro d'en em zifre-tañ na da skrijal. Den ebet er ru evit dont war he sikour. serret koufr an oto warni. Ar c'heflusker da yudal hag an oto kuit !

**Ur miz kentoc'h...Gwener 24 a viz Eost.**

Helen a oa o vale goustadik eus ar ponton betek ar c'hae, o soñjal er bourmenadenn he doa graet e-pad eurvezhioù war lenn-vor Brest. He sandalennoù lêt gell a stlake war ar c'hoad sklaer. Aet e oa gant he mignon Andrev hag e vagig-

dre-lien war ganol an Elorn, o tremen dindan an daou bont a stag Bro-Leon da Vro-Gerne. War ribloù ar stêr e weler tiez kaer tost d'an aod, hag ar chapelig Sant-Yann, goudoret dindan ar gwez. Ur gwir blijadur e vez arvestiñ outo. Sot e oa Helen gant troiadoù berr seurt-se war an dour. Plijout a rae dezhi mont war an enezigoù, anvioù brav dezho, evel Enez ar Morvrini, brudet-kaer, pe Enez Treberon, warni c'hoazh hiriv aspedennoù eus un ospital kozh gouestlet d'ar vartoloded pe d'ar c'haleourien. Pa c'hoarveze dezho mervel, o sebeliadur ne oa ket pell : Enez ar Re Varv a zegemere anezho evit o c'houisk diwezhañ.

Ken brav e oa an amzer an deiz-se, ken plijus he doa kavet flouradenn an heol war he c'hroc'hen, hag ar banne bier fresk he doa rannet gant Andrev.

Emberr e oa sañset Andrev mont betek an donvor... Divizet en doa treuziñ Mor Breizh ha mont da vageal a-hed aodoù Bro-Saoz.

– Distreiñ a rin a-benn miz, emezañ en ur amariñ ouzh ponton ar viziterien abalamour da Helen da vezañ tostoc'h ouzh hec'h oto.

« Emichañs e vin aze pa zistroi », a soñjas-hi en ur ober ur sin dorn. He blev gris a nije en aezhenn noz. He lunedoù heol a oa war he fri c'hoazh.

Skrijal a reas gant ar souezhadenn, pa welas a-greiz-holl ur skeud o stankañ he hent outi.

– Setu e-giz-se emeur o vageal, a lâras ur vouezh c’hoapaus.

– Kement-se ne sell ket ouzhoc’h, a respontas-hi. Lezit ac’hanon da dremen.





A-ziwar e vag o pellaat diouzh ar ponton, e welas Andrev anezhi, asambles gant ur paotr yaouank kreñv, dilhad teñval gantañ. O kaozeal e oant o-daou, a soñjas. Korntroiañ a reas ar regennoù bigi ha pa sellas a-dreñv evit ur c'henavo diwezhañ, ne oa den ebet ken war ar ponton.

\*

Na pegen eürus e oa bet Helen p'he doa sinet ar skrid gwerzh.

Un endervezh yen a viz Genver e oa pa oa bet digoret evit ar wech kentañ ar porrastell houarn gwer, gant an alc'hwez pounner nevez-roet dezhi gant an noter. Riñset he doa he c'hontoù betek ar gwenneg diwezhañ evit prenañ an ti-se, met ne vern. Arc'hant a-walc'h he doa da vevañ gant he leve kuit da stlejal an diaoul war bouez e lost evel m' he doa gwelet he zud, implijidi dister anezho, oc'h ober o buhez-pad. Ur wech paseet ar porrastell, he doa soñjet e pajennadoù diwezhañ Kastell va mamm gant Marcel Pagnol, a veze roet da lenn d'ar vugale ken abred hag ar c'hwec'hvet klas, hag a denne daeloù a-ziganti bremañ c'hoazh, evel pa vije bet an Augustine yaouank, ken kalonek ma oa, ezel eus he familh dezhi ha perzh en he buhez. He mamm dezhi ivez a oa marv pell a oa, ha biskoazh n'he dije kredet e teuje he merc'h nemeti da berc'hennez an ti bras, ar maner evel ma veze graet anezhañ er c'harter.

Eus he zud ne oa chomet ganti ‘met nebeut a dra. Ne oa ket plas en he c’hambr studierez e pevare estaj un ti kozh ru La Bourdonnais e Roazhon. Pa oa bet dav riñsañ ti bihan ar straedig François Rivière, e oa aet ar braz eus an traoù gant dilojerien Emmaüs. Kollet da viskoazh ar c’hanastell doubl, kollet pres he zud-kozh, tachoù melen warnañ o verkañ bloaz o dimeziñ, kollet talbenn ar gwelekloz bet lakaet d’ober un armel-levrioù.

Pa oa bet renket karr-samm an dilojerien dirak an ti bras e oa bet tennet er-maez anezhañ an holl deñzorioù bet dastumet gant Helen. Kadorioù kizellet eus Madagaskar, da vezañ lakaet dirak an oaled, ur c’houfr eus Bro Sina etre an daou brenestr, un daol manati hag an daou vank divent er gegin vras lambrusket gant koad gwenn. Pep tra a oa dibar ha kaer. Pep pezh a oa ul lodenn eus hec’h istor. He buhez eo a faote dezhi kaout dirak he daoulagad, ha ne vern ma ne glote ket al loc’hell kregin glas gant ar vag kozh kludet war an armel-levrioù.

P’he doa digoret an nor war « he » maner en doa lammet an heol war al leurdi evel ur c’hi sec’hedik.

Moaien zo da vevañ en un ti mod-kozh ha seurfñ war internet. Amzer dremenet hag amzer vremañ a gennev mat-tre, ar solieroù koad ne vironet ket ouzh ar rouedadoù hep fun da dremen. Eus prenestr he burev, en nec’h, he doa gwelet brankoù

uhel ar skavenn-wrac'h e korn an div voger-dro a rae un disparti etre he domani hag ar bed tro-dro.

Gant ur yudadenn skrijus en doa roet ar pod-birviñ da c'houzout e oa prest an dour tomm evit an te. Gourlammet he doa Helen, sanket en he soñjoù, dizroet he daoulagad diouzh ar skramm, lakaet al logodenn war an daol evit mont d'ar gegin. Eus un armel-voger he doa tennet un tas gwennlivet, delioù melchon glas warnañ, koun eus un hañvezh kampiñ e Bro Iwerzhon gant mignoned aet a-ziwar wel abaoe pell 'zo, lakaet ur sac'had te ha dour ennañ. Ha hi en-dro en he burev.

« Nag ur burzhud ar rouedadoù sokial », a soñjas ur pennad goude-se en ur lenn he fosteloù. Met perak on bet ken genaouek ?

Azezet e oa dirak ar prenestr digor, aer skañv fin an hañv oc'h en em silañ e-barzh ar burev, o sevel goulennoù outi hec'h-unan.

– Ne oa ket dleet dit asantiñ, he doa lâret he mignonez Suzon dezhi, biskoazh ne zeui a-benn d'en em zizober dioutañ.

Ya, perak he doa degemeret ar bedadenn-se war Facebook ? Evel digeriñ an nor hep sellout ouzh piv a oa war an treuzoù e oa!

Ne oa ket an hini nemeti a vije graet Arzel anezhi, neketa ? N'he doa lakaet foto ebet war

Facebook. An titouroù displeget diwar he fenn a oa eus ar verrañ : ar gêr ma oa o vevañ, ha setu tout. He darempredoù ne oant ket stank. Ha setu aze unan he doa laosket d'en em silañ e-touez he gwir vignoned, he c'heneiled bet, he nizezed ha nized. Nag ur sotoni ! Ne ziskrogfe ket ken bremañ.

### **Un nebeud deizioù kentoc'h e Kledenn-Poc'her.**

– Nag un droukchañs ! a grias Loeiza en ur lakaat he zroad war ar leur. Yen-ki eo en toull-mañ !

Kregiñ a reas en he sae-gambr c'hlas ha gwiskañ anezhi en ur c'hrozmolat. Ret e oa bet tennañ an dilhad-se eus ar voest-kartoñs bet berniet enni o zraoù tomm ganti ha gant he mamm.

« Na pegen kasaus eo, a soñjas, bezañ c'hoazh e Breizh e fin miz Eost, p'emañ ar balumed o vont kuit eus Mayotte ! Mamm he doa prometet din ober ganti un droiad war vag war dourioù don ar Mor Bras Indian, hag emichañs 'vefe bet gwelet ur vamm valum o teskiñ d'he hini bihan ar pep retañ evit kregiñ gant ar veaj hir etrezek Amerika ar Su. »

Ha setu ! Troc'het-naet oa bet he hunvreoù daou zevezh a-raok. Ur gwall lamm he doa graet mamm Loeiza, ha brevet hec'h ufern. Ne oa ket torret plaen nag aes da fichañ, evel just ! Nann !

Un toullad tammoù askorn bet ret soudañ anezho an eil gant egile, o lakaat brochennoù a bep seurt ! Ouzhpenn ur miz e oa ret da Vari anduriñ a-raok bezañ aotreet da vont en-dro d'he labour.

– Ha me, he doa huchet ar plac'h yaouank d'he mamm, petra 'vo graet ac'hanon keit ha ma vi e Kerpape o pareañ ?

– Mont a ri da di da dad, n'eus diskoulm all ebet.

An dra-se hag en defe lakaet anezhi, bloaz zo a-boan, e-kreiz he levenez, a laoske anezhi bremañ trist ha chalet. Goulennet he doa digant he zad lezel anezhi e ti Annwenn he mignonez a-gozh, evit ar miz o tont, mont a rafe d'ar skolaj, ma adkavfe an holl vignoned he doa bet darempredet dibaoe skol-vamm Kledenn-Poc'her. Met chomet e oa dibleg he zad.

– E Brest emeon o chom bremañ, du-mañ e teui eta ! Fin d'an diviz.

Ur pistig a starde kalon Loeiza. Mayotte a rae diouer dezhi. Echu e oa ar vakañsoù hañv, ha mall ganti adkavout o lojeiz e Combani, ar c'hambon bras ma veze o sellout ouzh ar ru hag ar skol-vamm en tu all. Hiraezh a oa dezhi adkavout skolaj Tsingoni m'he doa bevet ennañ warlene en ur c'hwec'hvet klas riboul-diriboul, ha dreist-holl mall adwelout Nakchami.

– Ne bado nemet betek an Hollsent en doa lâret he zad, evit frealziñ ar paourkaezh Loeiza.

Ha dre ma ne oa ket ar grennardez evit chom e Pennti-Ruz, he doa digoret ar c'hartoñsoù ha tennet er-maez stammennoù, bragoù ha mantilli evit un diskaramzer all e Breizh. Strizh un tamm e oa he chupenn en-dro dezhi, un nebeud santimetroù he doa tapet en ur bloavezh, met n'he doa ket santimant prenañ dilhad all. A-benn ur miz he defe gwisket shortoù, ti-shirtoù ha sandalennoù.

Pa serras dor Pennti-Ruz ne oa ket enni ar santadur-se ha na c'haller ket displegañ, a vesk eürusted ha keuz, hag a grog pa vezer o vont eus un dra a garer etrezek un dra a garer kement all. Nann, kounnar an hini e oa !

**Ar 24 a viz Eost, da zek eur mintin.**

Postel. Loeiza da Fanny

*« Paket on evit daou viz. Skriv buan din ! »*

Kaset he doa Loeiza he fostel kentañ, ken abred ha deiz an distro-skol e Mayotte. Unnek eur e oa du-hont dija, hag empennañ a rae ar mil skoliad o doa graet kement a aon dezhi warlene, o leuniañ gant o safar ar porzh-skol ec'hon hep disheol. Mont a rafe Fanny d'ar gêr da leinañ, rak ne chome er skol 'met ar re a veze roet dezho ur sandwich maiz, ton ha maionez, ur voestad chug orañjez hag ur frouezhenn. Evit lod e oa pred nemetañ an devezh. Gwashoc'h c'hoazh, darn

anezho a gase ar boued-se d'ar gêr evit magañ un toullad breudeur ha c'hoarezed yaouankoc'h. Spi he doa Loeiza e vefe ur respont buan digant he mignonez, ken modern ma oa dafar urzhiataerezh e ti bras Fanny. Ha diouzhtu e krogas ar gaoz etrezo dre internet.

– Petra zo c'hoarvezet ?

– Ma mamm zo bet gloazet.

– Grevus ?

– Ufern torret.

– Ne zistroit ket neuze ?

– Geo, e fin vakañsoù an Hollsent.

– Hir e vo. Du-se out chomet ?

– Ket ! E ti ma zad on bet kaset. E Brest.

– Nag a chañs ! Sine, stalioù... amañ n'eus mann ebet.

– Ne blij ket din chom e kêr !

Ha bla-bla-bla 'pad un hantereurvezh leun. Kevreañ a rafent c'hoazh. Diouzhtu pa c'halljent. Prometet. Amzer a-walc'h he doa Loeiza, peogwir ne vefe an distro-skol e Breizh nemet a-benn ur sizhun.

## **Gwener 24 a viz Eost.**

N'eus ket tredan e ti Nakchami, nag urzhiataer kennebeut. Er skolaj, tu ebet da vont war boestoù postel prevez. « Ma fell din eskemm

gant Nakchami eo dav distreiñ d'ar mod kozh, a soñjas Loeiza : skrivañ. Kemer ur follenn baper ha leuniañ anezhi. »

Paper lizher kaer he doa Loeiza, bet profet dezhi evit he deiz-ha-bloaz, bleunioù ha balafenned treset warnañ.

« Emichañs e raio plijadur d'am mignonez, a soñjas. Ale, deomp dezhi ! »

### *Salud, Nakchami*

*Ma zad en deus dilojet. E Brest emañ bremañ o chom en ur c'harter etre ar ru Jean Jaurès, ar ru an eil brasañ, hag an ti-gar a zo a-us d'ar porzh-mor.*

Chom a reas Loeiza a-sav, etre daou. Da betra a servijfe da Nakchami anavezout anv ruioù Brest ? Ha piv eo Jean Jaurès, da gentañ, ha perak 'vez roet anvioù tud d'ar ruioù ? Pa vez sellet pizh, e Mayotte e tiskleir an anvioù petra a c'heller kaout er ru : moskeenn ar Gwener, an ti-kêr, ar vered... Daoust da se, marteze e lakaio kement-se Nakchami da veajiñ un tamm, o soñjal ez eus tri forzh e Brest, unan a vrezel, unan a goñvers, hag unan evit ar bageal, hag ez eus ur c'hastell hag ur stêr e kêr. Ha Loeiza da genderc'hel gant he lizher.

*Prenet en deus ma zad ur stal medisin-loened er c'harter ha feurmet un ti bihan gant ur jardin. An ti-se ne blij ket kalz din rak hanter-douaret eo 'vel an*



*holl dier er ru, savet war bord an tornaod. Ar gegin zo en traoñ, izeloc'h evit ar ru. Er c'hentañ solier emañ ma c'hambr. Skeiñ a ra war ar pondalez, akomod eo, me lâr dit ! Dre chañs n'eo nemet evit daou viz.*

Evel pa vije bet o skrivañ un dever-skol e oa ar grennardez. Gant internet hag ar pellgomzerioù godell, ne vez ket kaset ken, abaoe mil bell 'zo, frazennoù klok gant pikoù ha pennlizherennoù. Merzhout a rae ivez pegen diaes e vez taolenniñ an traoù a-seurt ma vefe egile gouest da gompren ha da empennañ. Ma fell d'unan lâret pep tra eo ret skrivañ ul levr tost da vat. Peseurt liv eo ma zi, peseurt arrebeuri zo em c'hambr ? Petra a welan dre ar prenestr ? Ha daoust ha c'hoant he doa Nakchami da c'houzout kement-se, pe da c'houzout hag-eñ e soñje Loeiza enni ? Ya, met ma ne skrivfe nemet teir linenn « *Soñjal a ran ennout, diouer ac'hanout am eus* » e vefe ul lizher null, neketa ? Lakaat a reas he stilo e-kichen ar follenn baper. Echuiñ a rin diwezhatoc'h, a soñjas. Peogwir e oa tonket dezhi bevañ e kêr, e oa ret dezhi en em voazañ. Labrador he zad, ur pezh loen melen, pavek ha karantek, Monday e anv (ganet ul lunvezh) a oa un digarez eviti da furchal tro-war-dro. Eus ul liorz-hêr d'unan all ez ae da bourmen a-hed ar straedigoù tier koant ha jardinoù bleunioù enno, pe savadurioù gant porzhioù kloz. Gwelet he doa skalieroù a c'helled diskenn ganto da draoñ an tornaod, hag ur chapel

zoken, bet graet ul lojeiz enni. Meur a wech, o tremen a-hed ar skol-vamm dilezet, he doa gwelet kiez kozh ar maner, brumennet he daoulagad gant an oad.

– Piv zo o chom en ti bras-se ? a c’houlenas ur mintin digant Véronique, mignonez he zad.

– Unan hag he deus kalz arc’hant, a respontas ar vaouez yaouank. Ur vedisinez kozh ‘gav din.

– Un ti dispar, eme Loeiza. Mont a rafen da vedisinez evit kaout unan e-giz-se.

Gwechall, a soñje Loeiza en ur sellout ouzh ar glav puilh, e oamp ni ivez o chom en un ti bras, e penn pellañ un hent troidellek ha serzh. Un tamm mat re vras e oa an ti-se evidomp. Ma zud, p’o doa graet o annez ennañ, a oa spi ganto krouiñ ur familh vras, met n’eus bet nemedon, deuet eus penn pellañ Kambodj, evit trolal er milendall a gembroù-se. Dont a rae mignoned da c’hoari gant ar vrañsigell ha da sevel lochennoù er gwez, ha biskoazh n’em eus bet d’en em chalañ abalamour d’an diouer a blas evit lidañ ma deiz-ha-bloaz ha pediñ ma mignonezed da gousket. Met kement se a oa a-raok.

A-raok ma oa bet divizet gant ma zud n’en em garent ket ken, a-raok ma ne oa ket mui fellet dezho bevañ en un ti ken. A-raok Véronique, a-raok Mayotte. Ral a wech ‘veze gwelet ar vedisinez kozh. Gouloù e prenestri an nec’h nemetken

a roe da c'houzout e veze er gêr. Hailhenn a rae abaoe eurvezhioù ken ne veze ket gwelet ken al lenn-vor, klozet en tu all gant linenn zu gourenez Plougastell. O krenañ dindan ar glav dizehan, ar giez kozh a daole selloù trist tro-dro dezhi. Serret e oa ar porrastell. Moarvat e oa en em silet er-maez keit ha ma oa oto he mestrez o vont er ru hag e oa chomet tamolodet ouzh ar piler maen-greun, flac'hataet gant skourradoù-avel.

Gant an druez, Loeiza a lakaas ar paour-kaezh loen e karrdi he zad hag a frotas anezhañ evit e dommañ. O krenañ bepred e oa ar giez hag e lipas dorn ar plac'h yaouank.

Hag e-giz-se, pa gasas al loen en-dro d'ar maner ur pennad diwezhatoc'h e reas Loeiza anaoudegezh gant hec'h amezegez, hag e kemeras perzh, daoust dezhi, en un avantur dic'hortoz a verkas diskaramzer he daouzek vloaz.

## Sadorn 25 a viz Eost

« *Ur vaouez kavet beuzet er porzh* » e oa titl pennañ kazetenn ar Sadorn. Diskennet e oa ur c'houblad yaouank digwener d'abardaez betek o bag dre lien staget ouzh ar ponton C. Uhel e oa ar mor hag o soñjal e oant kaout avel a-walc'h da dizhout Kameled en tu all d'al lenn-vor.

Un hantereur goude bezañ bet galvet gant ar vaouez yaouank, o doa ar splujerien savet ur c'horf war ar c'hae. Lakaet e oa bet war ur pallenn da

c'hortoz ar mezeg-lezennel, un den ront, jestroù efedus dezhañ, bet gwelet gwashoc'h gantañ ha berr e gomzoù.

– Ur vaouez tri-ugent vloaz bennak eo, emezañ. Beuzet eo bet, war a seblant. Ar c'horfskejerezh a lâro hiroc'h marteze.

Afer an hini veuzet er porzh a gemeras plas er c'hazetennoù e-pad un toullad devezhioù. Helen Arzel e oa hec'h anv, a embanne an Télégramme an deiz war-lerc'h. O chom edo ru Sully-Prud'homme e Brest. Da heul ur pennad dek linenn o taolenniñ buhez ar vaouez-se, medisinez bet diplomet e skol-veur Roazhon, bet o labourat eno e-pad ugent vloaz e ospital Pontchaillou, hag bet goude-se e broioù pell, Guyana ha Mayotte, ma oa bet digoret ospitalioù nevez ganti. Chomet 'oa pemp bloaz ahont, betek he retred.

Soñjit pegen souezhet e oa bet Loeiza o lenn ar pennad-se. A-boan he doa graet anaoudegezh gant ar vaouez-se ha setu-hi bet kavet marv, kouezhet er porzh ur mintinvezh kaer e deroù an diskaramzer. Pegen bihan ar bed ! Iskis eo. Kement tra a selle ouzh Mayotte bremañ a oa tost da galon ar plac'h yaouank, evel ma rae pep tra a selle ouzh Breizh pa veze dek mil kilometr alemañ. Kurius e oa, netra all ganti d'ober a-raok an distro-skol, klask a reas ar skolajiadez gouzout hiroc'h. Lenn a rae pizh ar c'hazetennoù lec'hel, ha mont a rae

war lec'hiennoù internet, ken e teuas da c'houzout, souezhet, e oa hec'h amezegez estreget medisinez. Krouet e oa bet ganti meur a gevredigezh difenn ar maouezed, e kement lec'h ma oa bet o labourat, stourmet he doa bloavezhioù-pad evit ar gwir da vervel en un doare dereat, rak ne oa ket he soñj derc'hel an dud bev hep soñjal en o foan.

– Abaoe pemp munut eo paret da zaoulagad war ar gartenn-bost-se war ar voger. Petra interesant a gavez warni? a c'houlennas Pierre ouzh e verc'h.

Gourlammat a reas Loeiza. Dihunet fall e oa, c'hoant ebet ganti da gontañ kaoz. Ar Sadorn a oa, raktres ebet evit an dibenn-sizhun nemet mont da welout he mamm en he c'hreizenn addiorren.

– N'ouzon ket, emezi. Ka'out a ra din eo krog ar glav da zigalonekaat ac'hanon.

– Te ha ne oa kaoz ganit nemet eus hin Breizh en da bosteloù warlene, a lâras an tad. Gwelout a ran out boazet buan da heol an trovanooù. Pelec'h eo tremenet va flac'hig a lamme er poulloù dour en ur c'hoarzhin ?

– Ma ouijen ! a huanadas Loeiza. Amañ e vezomp sebeliet dindan bernioù dilhad hag e teuomp tout da vezañ heñvel ouzh pengouined gwenn ha du.

Kregiñ a reas Pierre da c'hoarzhin, ur c'hoarzh ken tomm m'he doa c'hoant ar grennardez d'en em deurel etre e zivrec'h evel gwechall. Padal, ne fiñvas

ket. Chom a reas labaskennet war he c'hador, un dorn ouzh he jod.

– N'emañ ket ar gaou ganit penn-da-benn, a gen-dalc'has he zad. Gwisket divalav e vez an dud alies, met ne ouezez ket piv int e gwirionez. Arabat mont re vuan.

Kroc'hen teñval Loeiza hag he blev du, fin ha flour 'vel ur ouel seiz, a ziskoueze fraezh he orin hag abeg he c'homzoù c'hwerv. A-viskoazh he doa kavet brav al livioù flamm hag an danvezioù skedus ha skañv.

Ur sell hir etrezo. Kompren mat a rae an tad o defe soñjoù e verc'h nijet trema an enez pell-se el lec'h m'he doa goulennet mamm Loeiza ur post labour abalamour d'an torr-dimeziñ.

Gwallzarvoud Mari a oa ur chañs en ur mod rak diouer ivez en doa bet d'e verc'h. Kalz.

– Ale, a-benn c'hwec'h sizhun ez i en-dro, ha kred ac'hanon, c'hwec'h sizhun en ur vuhez n'int mann ebet. Evidon, ne vin ket pilpous : plijet bras on e vefes ganin un tamm.

Loeiza a savas d'en em deurel etre e zivrec'h.

– Kaout div vuhez, ur chañs hag ur rangalon eo war un dro, neketa ? emezañ, en ur bokañ dezhi war he c'houg.

Setu e oant aet da vizitañ Mari ar Sadorn-se goude kreisteiz. Bale a rae dousik war bouez div vazh-loaek. Ret e oa bezañ pasiant, kement a dammoù a oa da adstagañ ha da startaat. An dour, ar c'hine, ha dreist-holl he nerzh kalon a zegase gwelladennoù kaer. Anavezout mat he mamm a rae Loeiza : ne oa ket troet da glemm na da drueziñ war he c'hont.

War hent ar gêr, ne fellas ket da Loeiza na d'he zad mont war-eeun gant an hent tizh, hag e-giz-se e oant degouezhet e Rumengol. Sklêrijenn an abardaez a alaoure mein an iliz. Ur wech renket an oto a-hed ar voger-dro, e oant aet da weladennin al lec'hioù. Ur pezh kazh marellet a rae grallig war bord ur prenestr, geot ar c'hloz a oa glas c'hoazh, c'hoant o doa da azezañ. Kant metr pelloc'h, e traoñ an hent e oa mein ar feunteun.

– An dour amañ, a zisplegas an tad, zo brudet abaoe ar Grennamzer evit yac'haat an holl boanioù. Betek amañ e teued da birc'hirinañ evit goulenn digant ar Werc'hez pareañ ar re glañv hag ar re vac'hagnet a bep seurt. Goude bezañ tremenet en iliz e veze an ehan dirak ar feunteun.

O welout ar poull leun a zour chag, n'he doa ket bet c'hoant Loeiza da amprouiñ galloud burzhudus ar feunteun. Ouzhpenn-se e embanne ur skritell vihan « an dour n'eo ket mat da evañ ». Redet en doa kalz abaoe an amzer gozh, moarvat.

Azezañ a reas ar grennardez war an diri, oc'h arvestiñ kizelladurioù ar c'hustod mein. « Anez da evañ, koulz ober ul le » a soñjas en ur furchal en he godell. Hag ar gweneg a ziskennas didrouz hag a 'z eas diwar wel, goude toullañ ur faout er bleud-dour.

## Sul 26 a viz Eost – un emgav iskis

An deiz war-lerc'h e savas Loeiza abred hag e reas gant Monday un hir a droiad a gasas anezho uheloc'h evit kastell Kerstears, deuet da vezañ lise abaoe ar bloavezhioù hanter-kant. Diaes 'oa da Loeiza krediñ ne oa ar c'hastell-e-douribelloù-se nemet kant vloaz a-boan. Eviti pep savadur kozh a gase d'he levr istor, d'ar Grennamzer ha d'ar varc'hegerien.

Kaer en doa Monday sachañ war e lêrenn, e chomas Loeiza en he sav dirak un arvest dic'hortoz: war-lein moger ar maner e oa ur vaouez lart un tamm ha kozh a-walc'h. Sachet he doa ur boubellenn vras, ha kroget e fust ur banell evit krapat. Chom a rae en entremar a-raok lammat er jardrin. Pa verzas e oa Loeiza (ha Monday) o sellout outi e huchas ouzh ar plac'h yaouank:

– Na chomit ket plantet aze ! Kasit un dra bennak din evit sikour ac'hanon da ziskenn. Ur gador, da skouer !





Hanter-droet e oa he fenn war-zu Loeiza a gendalc'he da barañ he selloù outi. Bremañ e roe an arvest c'hoant dezhi da c'hoarzhin. Empennit ur vaouez vihan kuilh, mantell ruz ha bragoù roudennet warni, azezet diasur he c'hempouez daou vetr a-us ar ru. Ha penaos an diaoul he doa kavet an tu da grapañ war-laez ?

– Ac’hanta, eme ar vaouez, o c’hortoz ac’hanon da gouezhañ emaoe’h ?

Loeiza a dalas outi, flemmet gant ar vouezh tagus-se.

– Ha piv oc’h evit reiñ urzhioù din ? Ha petra emaoe’h oc’h ober e kreiz-kêr Brest, pintet war-lein moger un ti prevez ? Me ned an ket da bourmen ma c’hi gant ur skabell dindan ma brec’h !

– Petra emeon oc’h ober ? a respontas ar vaouez, dousaet dezhi un tamm. Klask a ran mont tre du-mañ, setu tout.

– Met, marv eo ar berc’hennez, eme Loeiza. Daou zevezh zo da nebeutañ !

– Te ‘lâr forzh petra ! Din-me eo an ti-mañ. O vont da sikour ac’hanon emaoe’h pe get ?

Abred e oa c’hoazh ha Sul a oa, gant-se e oa digenvez ar ru. Daoust ma n’eo ket un hent darempredet-stank e veze memestra war greiz an deiz annezidi ar c’harter o vont d’ar burev butun pe d’an ti-bara peuztost, mammoù o kas o bugale d’al liorzhañ pe, evel Loeiza, mistri damantus o pourmen o mignoned war bevar zroad.

O sachañ war lêrenn Monday, bet o tiskuizhañ e-pad an ehan-se, e redas ar plac’h yaouank d’ar gêr, hag e tistroas ur pennad goude-se hep ar c’hi, hag ur gador-bleg ganti. N’he doa ket kredet dihuniñ he zad evit goulenn outañ pelec’h e veze renket ar skabell. Gant ma ne dorro ket gant pouez ar boudoupenn-mañ, a soñjas.

- Sed 'pezh am eus kavet. Mont a raio ?
- Degas anezhi din, eme ar vaouez, lakaat a rin anezhi en tu all.

Ne oa ket bet ezhomm pell amzer evit kendrec'hiñ Loeiza da vont ganti. Petra welloc'h he doa hi d'ober, forzh penaos ? Mont ha dont div wech gant ar gador dreist ar voger, hag o-div e oant er jardrin. Glas-kaer e oa al leton war-lerc'h devezhioù glav. Spoueennek ha blot e oa an douar, met war an ale grouan gwenn e oa moaien da vont a-sec'h. Delioù hir ur wezenn-vananez a heje goustadik e korn al letonenn.

- Suzon eo va anv, eme ar vaouez. Bremaik e tisplegin dit, met da gentañ eo ret din mont tre. Deus !

Un nor goad vihan a-dreñv an ti a zigoras brav pa lakaas an alc'hwez en toull.

- Helen an hini eo he doa roet anezhañ din, a zisplegas Suzon dirak daoulagad sebezet Loeiza. Hini ma ranndi a oa ganti ivez.

Hep koll amzer ez eas ar plac'h yaouank da heul ar vaouez. Mont a rejont dre un trepas teñval. Buan, evel pa vije bet unan bennak o c'hortoz anezho.

- An dra-mañ eo a fell din kas ganin, eme ar vizi-tourez.

Edo o tiskouez an urzhiataer war ur daol vras.

– Sell en diretenn-se, ur voest leun a zafar bihan hag orjalennoù a zlefe bezañ. pep tra a vo kemeret !

Sabatuet, Loeiza ne lâras grik. Anat eo e oa kenlaerez, gant unan dianav, war greiz an deiz, ur c’hant metr bennak eus ti he zad.

## E keit-se

E-keit-se, pell-tre diouzh Brest, e oa Nakchami o prederiañ. Trouz ar skolajidi er porzh-skol ne drubuilhe ket he soñjoù. Boas e oa ar plac’h trizek vloaz da vevañ e-touez an trouz. En he c’harter, savet a-dreñv mogerioù tol pe delioù bananez, ne oa plas prevez ebet. Er gêr e veze ganti ar re vihan da evezhiañ keit ha ma veze ar vamm o vont da varc’had Combani, evit gwerzhañ un tamm legumaj eus al liorzbig he doa prenet mizioù’zo.

Ar skoliadez a oa ganti en he godell al lizher bet treuzkaset dezhi er skolaj gant Fanny. Gortoz a rae bezañ en hec’h-unan un tamm a-benn lenn anezhañ. Moarvat e vefe er sal studi etre ar gentel saozneg hag hini jedoniezh. Lammat a rae he c’halon gant an hiraezh. Ar wech kentañ e oa dezhi kaout ul lizher, hag eus Frañs, ouzhpenn. Un timbr kaer a ginkle ar golo paper tev kaeraet gant bleunioù glas iskis n’he doa bet gwelet biskoazh.

Hortensia a Vreizh a lennas er gerioù skrivet bihan war ar golo-lizher.

– Evidout eo, he doa lâret Fanny pa oa erruet er skolaj. Pariañ a ran eo bet div sizhunvezh al lizher-se gant e hent.

Ne rae forzh ma oa kozh ar c'heloù dija ! Deiziad al lizher a oa dek deiz 'oa, an deiz ma oa bet kouezhet Mari, ha daleet ar veaj ganti ha Loeiza. Evit Nakchami e oa he c'hentañ lizher, a ziskoueze ne oa ket ankounac'haet gant he mignonez. Gant ma vefe Loeiza o kemenn he distro a-benn nebeut !

## Lun 27 a viz Eost

En e vurev war ar vali Dajot e tremenas an aotrou Ansker, noter, e zorn war e dal. Kroget e oa da vezañ heuet gant an istrogell-se, ha n'en doa ket lâret e anv zoken, hag a felle dezhañ kaout titouroù diwar-benn susit an itron Arzel. Ne vez ket roet keloù war seurt traoù-se dre an telefon, memestra.

– Selaouit, Aotrou, a lâras, gant e vouezh ofisiel, ret e vo deoc'h goulenn un emgav ma fell deoc'h gouzout hiroc'h. Gwelit kement-mañ gant ma sekretourez.

Skourrañ a reas an telefon, o troc'hañ berr an eskemm.

« Souezhet ‘vefen e klevfen kaoz anezhañ c’hoazh », a soñjas. Ne oa ket bet digoret an testamant ha krog e oa al luziadennoù.

E penn all al linenn aet war dav e tage gant ar gounnar ur paotr yaouank, Fouad e anv.

– Ne dremeno ket e-giz-se ! Prometet he doa din, ar c’hozh kroc’hen-se. N’eo ket reizh, a c’hrozmol-  
las.

Kregiñ a reas da vont ha da zont, nervus, e saloñs ar rannidi bihan ma loje gant daou vignon, studierien ivez. Unan a zeue eus Mayotte, eveltañ, anaoudegezh o doa graet e lise Sada e-touez an holl dud yaouank eus kreiz ha su an enezenn. An trede, Ewen, a oa ur paotr trankil, deuet eus Penn-  
ar-bed evit studiañ ivez e Bourdel. Er bloavezh kentañ war ar Gwir e oant o-zri.

Soñj mat en doa Fouad eus an doare m’ en doa adkavet roud eus Helen Arzel. Aet e oa-hi a-ziwar wel eus o buhez, pemp bloaz a oa, hep soursial da reiñ an disterañ displegadur, hep derc’hel soñj eus tout ‘pezh he doa prometet. Met war Facebook e oa ar paotr, ha gouzout a rae implijout ar benveg strobiniellus-se. Lakaet e vez, sañset, e gwir anv evit bezañ adkavet gant anaoudeien a gozh. Ur bajenn en doa, hag en doa kaset ar memes linen-  
noù d’an holl Helen pe H. Arzel bet kavet gantañ « Kavout a ra din ‘m eus bet anavezet ac’hanoc’h e Mayotte ». Respontet he doa unan « Bebet ‘m

eus eno », ha setu Fouad o pourmen brav war he fajenn evit kaout an titour meur : o chom e Brest e oa an dreitourez-se...

Aes e oa bet ar peurrest. Chomlec'h, telefon : pajennoù melen al levr-pellgomz zo graet evit se. Damzigoret he doa an nor, dezhañ da vont pelloc'h.

\*

Hir e oa eil lizher Loeiza da Nakchami. Sikour a reas anezhi da zisoñjal, ur pennad, huchadennoù he c'hoarezed bihan. Amzer vrav a oa, deizioù kentañ miz Gwengolo, met sec'hedik e oa ar maezioù. Ar gwez-mangez a oa dilufr o delioù glas.. O c'hortoz ar glav e oant evit reiñ frouezh. Strakal a rae ar geot, sec'h e oa ar raden, met nag ur blijadur bevañ dindan an heol, a soñje-hi en ur adlenn ar pennadoù ma klemme Loeiza gant ar glav a gouezhe a-hed an devezh war Brest. Deizioù 'zo ne vez ket gwelet tu all al lenn-vor zoken, a skrive-hi. Klask a rae Nakchami empenañ ar gêr-se, diliv, savet war bord ur mor gris ha yen. Amañ ez eus liv gant pep tra. An douar ruz, an oabl glas skedus, an dud du, o dilhad un drugar evit an daoulagad. N'eus ket 'met sellout ouzh ar maouezed gant o salouva o livioù flamm, tresoù a bep seurt warno, greun kafe, evned liesliv, bleunioù hibiskus pe poltred prezidant Bro C'hall. Hi, an deiz-se a oa ur sae glas en-dro dezhi, fleur gwenn

brodet warnañ, profet dezhi gant he mamm evit tremen er pempvet klas. An hini vrasañ er familh e vefe ma kendalc'hfe, ken hir ha moan ma oa. Hag an hini goantañ marteze. Lennañ a reas linennoù diwezhañ al lizher.

*« Amezegez ma zad zo marvet an dibenn-sizhun-mañ. Bevet he doa e Combani pemp pe c'hwec'h vloaz zo. Bihan eo ar bed, neketa ? »*

\*

Loeiza he doa asantet mont gant Suzon da Ostaleri ar Blasenn, goude bezañ kaset ar gador d'ar gêr. Laosket he doa ur gerig evit he zad, en e wele c'hoazh, da reiñ dezhañ da c'houzout e oa aet da brenañ timbroù hag ar gazetenn. Ne oa 'met ur pratik d'an eur-se, o komz eus melldroad gant mestr an davarn.

Lonket he doa an disfiz a vage ouzh ar vaouez kurius ha dizaon-se he doa lakaet da laerez da gentañ. Enoeüs e oa he buhez, ken e kave dedennus darvoudoù dic'hortoz evel hennezh.

– Te zo o klask gouzout penaos e oan krapet war ar voger-se, neketa ? E gwirionez n'ouzon ket me ma-unan. Kounnaret-ruz e oan.

– Ouzh piv ?

– Ouzh ar bed a-bezh. Marv dic'hortoz Helen, ar medisin-lezennel o lâret e oa ur gwallzarvoud, degemer divalav an ti-polis pa 'z on bet kaset da strakal brulu ganto ouzh an telefon.



Loeiza a laoskas anezhi da gaozeal. Treiñ a rae ar blouzenn en he gwerennad limonadez-sivi. Lakaet e oa diaes abalamour d'ar from a sante e mouezh Suzon.

– Gouzout 'rez, a gendalc'has homañ, anavezout a raen Helen abaoe bloavezhioù al lise. En eilvet klas e oa ha me er c'hlas termen p'hor boa komzet an eil gant eben evit ar wech kentañ. Hag ar wech diwezhañ zo bet evit lâret dezhi e oa oc'h ober ur pezh sotoni.

Loeiza ivez a soñje en he mignonez a-bell. Int-i e oa er c'hwec'hvet klas o doa graet anaoudegezh, ha spi bras he doa e vefent bev ha mignonezed c'hoazh, pa vefent ken kozh ha Suzon hag Helen.

– Ret e vefe dit mont war-eeun da gaout ar fiked, a guzulias Loeiza dezhi. Dre delefon e vez aesoc'h kas unan bennak da sutal, met ma 'z ez d'o c'haout e vi degemeret. N'ez peus netra da goll.

\*

Alc'hwezioù ar maner a chomfe gant ar polis ken na vefe disklêriet ar marv evel unan naturel. Neuze e vefent restaolet d'an noter. « Koulz taoler ur sell, kement hag ober, a zivizas an enseller Henaff. Perak eo ken sur ar vaouez kozh-se eo bet lazhet he mignonez ? a soñjas en ur chaokat ivin e viz meud. N'o deus ar retredidi-se netra all ebet

d'ober nemet c'hoari detektivoù ar filmoù tele ? Hag amerdiñ ac'hanomp gant o martezeadennoù droch ? Ar skej-korf n'en deus roet netra, panevet ur vronduen war an ibil-skoaz, a c'hell bezañ bet graet dre skeiñ ouzh ar ponton. Peogwir eo din da glozañ an doser, kenkoulz eo ober mat va labour. »

Ur visit iskis en doa bet, e gwirionez, un eurvezh 'oa.

– Piv zo e karg eus an enklask war marv an doktorez Arzel », he doa goulennet ur vaouez damheñvel ouzh ar margodennoù koad e vez kavet er stalioù artizanerezh rusian war marc'had Nedeleg. Ur beg bras a vaouez, avat, rak a-boan ma oa bet degemeret e burev an enseller, e oa bet beuzet gant he goulennoù. Piv 'oa en em gavet gant Helen? Piv en doa bountet anezhi en dour ?

Evel ur gorventenn e oa Suzon, ne oa ket evit chom azezet pemp munut war he c'hador, ha mont ha dont, o lâret ned ae gwech ebet ar polis betek penn an traoù.

– Azezit ! en doa kemennet an enseller, ha chomit sioul !

– Ha n'eo ket labour ar polis ? he doa balbouzet, lakaet bout gant ton rok ar poliser. N'eo ket dleet deoc'h enklask war marv dic'hortoz an dud ?

– Ho mignonez ne oa ket yaouank ken, en doa respontet an enseller. Riklet he deus diwar ar ponton

ha kouezhet en dour. Beuzet. Ordin a-walc'h e vez gwelet seurt darvoud.

– N'eo ket posupl !

Uhel e oa he mouezh gant ar vaouez adarre, un tamm aotrouniek.

« Unan c'hoazh a soñj dezhi eo ret d'ar bed-holl sentiñ outi » en doa soñjet Ronan Henaff, hegaset.

– Bageal a rae Helen abaoe bloavezhioù ha biskoazh n'he dije riklet war ur ponton, en un devezh heol dreist-holl.

O krenañ e oa mouezh Suzon un disterañ.

« Gant ma n'em lakaio ket da ouelañ » en doa soñjet an enseller, en ur astenn ur voestad mouchoueroù paper dezhi. Kemer a reas unan ha lâret mersi en ur sin. Renket he doa he brozh c'hlas, un dra ampl, evel troc'het en ur rideoz, serret gouzougenn he c'horfenn, ruflet un taol c'hoazh a-benn adkregiñ gant ur vouezh siouloc'h.

– Anavezout a raen anezhi abaoe hanter-kant vloaz, 'welit ket ! Sur on ez eus degouezhet un dra bennak ganti. Gouzout a ran ivez emac'h o soñjal n'ou nemet ur randonerez, kollet va spered diwar ar glac'har.

– Tremenet eo an obidoù ?

– N'int ket, diriaou 'vint en iliz Sant-Mikeal. Graet 'm eus war o zro, goude m'eo bet kaset ar c'horf da greizenn ar re varv.

– N’he doa familh ebet ?

– Kendirvi a bell e-kostez Naoned, marteze. Me eo an hini dostañ. Sevenerez an testamant on, ha moarvat he heritourez.

– Ne lâran ket e rin burzhudoù, eme an enseller. O vont da studial an doser emañ, keloù a roin deoc’h.

Savet e oa da ambroug anezhi betek penn an trepas, ha distroet en e vurev. Aferioù all a oa war ar stern.

Derc’hel a reas d’e c’her memestra. Mont a reas an deiz war-lerc’h da gaout ar medisin-lezennel. Ouzh an telefon en doa displeget ar perag eus e visit, daoust ma ne c’hortoze ket kalz a dra.

Ront, ruz e zremm, damvoal, e oa ar medisin tres koshoc’h warnañ evit e bemp bloaz ha tregont. Skuizh-divi e oa, ‘toare, ar mintin-se « Koulskoude n’eus ket kement-se a dud varv d’ober war o zro en departamant » a soñjas ar poliser.

– Ne welan ket petra ‘m ije da lâret deoc’h ouzhpenn, eme ar medisin en ur lakaat ur golo-lizher rous war e daol-studi. Ma meno n’eo ket cheñchet abaoe ar penn kentañ pa oan bet war al lec’h.

– Merk all ebet war he c’horf ?

– Marteze he doa skoet ouzh peulioù houarn ar ponton, ha bloñset kostez hec’h ibil-skoaz. Marteze he doa klasket tapout krog un tu bennak,

ha torret hec'h ivinoù.

– Hec'h ivinoù ?

– Ya ! daou anezho zo torret.

Ar medisin a zigoras ar golo. Div foto a oa ennañ. Astenn a reas anezho d'an enseller.

– Sellit, gwelet mat e vez ar vrondueñ war an ibil-skoaz. Evit ar bizied, gwelit hoc'h unan !

– N'eo ket peurfraezh, avat ! Chomet eo re bell en dour.

– Ouzhpenn-se, kozh a-walc'h e oa ar vedisinez, ha fall he yec'hed. Tapet e oa gant ar c'hrign-bev. Ne vije ket padet pell, anat deoc'h. Marvet eo buanoc'h evel-se, hep re a boan.

Sevel a reas an enseller ha trugarekaat ar medisin. Trankilik ez eas dindan sklaerder an oabl, desachet gant c'hwez klouar gwastilli ar bouloñjerezh tostañ.

\*

An endervezh a oa oc'h ober e dalaroù, war hiraat ez ae skeudoù er jardrin. An ti a seblante gortoz distro e vestrez. Er gegin e oa listri an dijuni diwezhañ bet lakaet da sec'hañ, goustadik e rouzmouze ar yenerez. Bent a oa en ur pod war bord ar prenestr. Un nebeud avaloù en ur gest, ur gazetenn pleget war an daol. Digeriñ a reas Ronan Henaff pep dor, furchal e pep pezh, lenn titloù he

CDoù hag he levrioù. An hini a oa o lenn a-raok he marv a oa chomet war an daol-noz, digor frank. Kranded an heureuchin a lennas ; un tamm soñj en doa da vezañ klevet ur pennad-barn meuleudius er radio. En ur pezh arrebeuri mod Sina, warnañ enskantadurioù nakr a gave euzhus, e oa renket tremen-hent ar vedisinez, he chekennaouegoù, kartennoù- kred, hag ur strobard bilhedoù.

En ur pezh bihan e penn all an trepas e welas ur pezh mell taol koad ruz. Bet degaset eus an Trovanoù moarvat, a soñjas. War un estajerenn, ur voullerezh diluget hag un telefon. War an daol, etre ur podad kreionoù hag ur geriadur, un tapis-logodenn.

« Mankout a ra ar urzhiataer, a verzas an enseller. Pelec’h an diaoul emañ ? »

\*

Skeudenn Suzon krapet war moger ti Helen, a zalc’has Loeiza en imor vat a-hed ar Sulvezh. « Eüruzamant ne oa ket aet da bignat dre lein ar porrastell, ar begoù houarn anezhañ n’int ket degemerus », a soñjas en ur vougañ ur c’hoant diroll da c’hoarzhin.

\*

Dres d’an hevelep poent, e oa Fanny, azezet ouzh he daol-studi, o lenn he fajenn Facebook. Ne

zeue ket a-benn d'en em zizober diouzh he gwarizi abalamour da Loeiza, war un dro mignonez dezhi ha da Nakchami, ha ne felle ket dezhi ober un dibab etrezo. Ne oa ket evit kompren al liamm a oa etre unan a Gambodj deuet da vezañ Breizhadez, hag ar Gomorianez-se hag he doa kavet bod e Mayotte e-maez al lezenn, hag a lakae kement a startijenn en he buhez a vizer. Pa dremenent war an hent, ne rae Fanny van ebet ouzh Nakchami, ha biskoazh n'he dije ar plac'h dibaper kredet toullañ kaoz ganti. Mignonezed an hevelep plac'h e oant ha setu tout. Ha bremañ evit chom leal da Loeiza e veze ret da Fanny reiñ da Nakchami al lizheroù a zegase dezhi Loeiza eviti. Un deiz bennak, marteze, e vefe ur voest-lizhiri a-dreñv ar peulgae seier-riz, hag e yafe paotr al lizhiri d'en em goll e milendall ar gwenojennoù douar ruz, o kammdreiñ etre al lochoù tol.

« Pa soñjan 'm boa gouelet kement-all en nevezamzer e Combani o kompren ne wellfen ket ar wech-mañ ar c'hleuz goloet a rouanezed dirak ti Penn Ti Ruz, pe strinkadennoù ar fleon e traoñ ar wenojenn », a lavare Loeiza outi hec'h-unan, azezet war ur gador houarn gwer, er porzhig a-dreñv ti he zad. Pierre hag e verc'h a oa kustum d'en em chabousat a-zivout liv rouanezed Penn Ti Ruz. Gwechall.

– Glas int a lâre an tad.

– Forzh petra ! Gell-mouk int, a responte Loeiza.

Mouk evel melchon, ha kleierigoù ar fleur-koukoug.

Bremañ ne raent ket mui ar rouanezed kement a ziouer dezhi. Ar plant bougeñvil roz dirak skolaj Tsongani hag ar wezenn-bara e krec'henn Combani e oa ar re a vanke dezhi.

E-pad ma oa ar skolajiadez o rambreal e-giz se, e oa ar poliser o prederiañ. Pelec'h an diaoul e oa urzhiataer Helen Arzel ? Mard e oa diskennet da bourmen war ar porzh ha ne oa ket distroet, petra he doa graet anezhañ ? Ha fiziet he doa anezhañ en unan bennak a-raok? Kaset da adaozañ en ur stal urzhiataerezh, en un tu bennak e kêr ?

Neuze perak n'en deus ket bet hennezh roet da c'houzout p'eo bet embannet he marv ? Martezeadenn ziwezhañ : unan bennak 'oa aet en ti evit laerezh ar benveg ? Daoust hag-eñ e ouie hennezh ne zistrofe ket Helen ? Daoust hag-eñ en defe bountet anezhi en dour ?

Huanadiñ a reas. Ret e vefe goulenn digant holl dreserien urzhiataerioù Brest hag-eñ ne oa ket bet degaset ar mekanik-se dezho d'ober war e dro.

Goude-se, diskenn d'ar porzh ha goulennata ar voraerien, dreist-holl ar re a zo o chom war vourzh. Unan en defe gwelet pe klevet un dra bennak marteze.



Al Lun-se, dek mil kilometr eus Brest, e oa Mounissa o rambreal ivez. O paouez diskenn eus ar c'harr-skol a zegase anezhi eus Sada. O treuziñ ar c'hroazhent tost d'an ti-post e oa. Tri den kozh war an oad, gwisket gant pep a djellaba gwenn, a oa azezet war ur bank koad er porzh bihan. Sellout outi a rejont. Eno e chomfent betek an abardaez pa 'z afent etrezek an tier ma vefe roet bod ha boued dezho gant o bugale.

« Petra zo ret din ober? » a soñjas en ur vont gant he hent. Ma bloavezh diwezhañ el lise eo, ha nac'het eo bet ouzhin ma faperoù broadiñ. Triwec'h vloaz e vin en nevezamzer ha ma tapan ma bachelouriezh e miz Even e c'hallin goude-se bezañ argaset ha kaset da g/Komorez en-dro. Ne fell ket din !

Ken stank e vez an argasadennoù e Mayotte. Familhoù a-bezh deuet war vor da guzhat er maezioù pe tost d'ar c'hêrioù gant aon rak taolioù evezhierezh ar polis. Gouzout a rae e tifenne al lezenn c'hall teurel er-maez ar skolidi a oa kroget da ober studioù ken e vefe paket ganto o zriwec'h vloaz. Setu perak e oa er skolajoù bugale o lâret e oant daouzek vloaz pa oant pemzek, pe triwec'h el lise pa oant tri war 'n ugent. En ur c'hwitañ war he bachelouriezh, en ur eilañ he c'hlas, e kreskfe ar plac'h yaouank he chañsoù da gaout ar paperoù-se.

He zrede goulenn en isprefeti e oa. E Mayotte e oa abaoe pemp bloaz, kaset kuit eus Komorez Vras da vevañ gant he c'hoar henañ Anyat.

Ober labour fall goude bezañ bet a-viskoazh ur skoliadez vat a oa un dibab diaes d'ober. C'hwerv e oa an dibab. Respont fall, drastañ he deverioù, traoù na oueze ket ober. Abaoe penn kentañ he studioù er skolaj he doa labouret a-lazh-korf. Daoust d'ar skuizhder, d'an anerioù, d'ar c'houez, d'al labour-douar, d'an aon, e oa ret mont war-raok. Ar paperoù a zeufe, ha goude ar vachelouriezh e vefe diplomoù all. Klañvdiourez e vefe. Pe medisinez. Gant he diplom e c'hallfe labourat forzh pelec'h, hep bezañ dalc'het gant unan bennak.

E korn ar ru e oa he mignonez Moina o c'hortoz anezhi.

## **Deiz kentañ a viz Gwengolo**

– Met sot-nay out ! a grias Annwenn pa gontas Loeiza dezhi avantur ar Sul tremenet.

Dre forzh aspediñ o c'herent e oant deuet a-benn an eil hag eben : deuet e oa Annwenn da dremen an dibenn-sizhun e Brest. Ne anavezent ket mat kêr nag an eil nag eben, met en ur pemzek-tez bennak he doa gounezet Loeiza un tamm lañs, ha daou hir a zevezh he doa bremañ evit c'hoari he ambrougerez. Da gentañ, anat eo, pignat ha

diskenn, pe er c'hontrol, ruioù Jaurès ha Siam, el lec'h ma 'n em gav yaouankiz kêr, mont da dañva boued mat Mac Do kreiz-kêr a-us ar ru, 'pezh a ra tro da sevel komerajoù war an dremenidi.

– Ha perak ez peus asantet ? a c'houlennas ar vizi-tourez en ur splujañ ur fritezenn er c'hetchup.

– Hir e kavan ma amzer. Amañ n'anavezan den ebet. Gwashoc'h eo evit e Mayotte. Du-hont a vousec'hoarzh an holl ouzhit er ru, « demat » 'vez lâret dit e pep lec'h. Amañ mann ebet ! Soublañ o daoulagad a ra an dud, pe dizreiñ o sell. Merzhet em eus se meur a wech pa vezan o pourmen Monday er ruioù. Pa saludan unan bennak e sell ouzhin gant disfiz evel pa vijen o vont da dagañ anezhañ gant un « demat ». Setu p'he doa komzet ouzhin ar vaouez tev-se, a-ziwar ar voger, e oan bet kontant a-benn ar fin.

– Mat-tre ! Mat-tre ! N'en em blijez ket amañ, neuze forzh petra zo mat dit evit lakaat pebr en da vuhez, aze emañ ?

– Penn-da-benn, a respontas Loeiza en ur laerezh ur fritezenn diganti. Tri mil enoet e vezan. Ha war varc'h-houarn ez in d'ar skolaj-se e kreizkêr, setu ne vo den ebet ober an hent ganin.

'Pezh zo kaer gant Annwenn eo e c'hoarzh diwar forzh petra. « Donezonet eo evit al levez » he doa lâret Mari diwar he fenn. Ur c'hardeur goude-se e oant azezet war diri an ti-kêr, oc'h

arvestiñ ouzh ar gwelva. Bugale a c'hoarie gant ar bommoù-dour. E penn traoñ linenn an tramgarr a zarbar straed Siam, e vefe bet gwelet kazimant kof ront an tour Tanguy savet a-us ar stêr hag a dalvez da c'henoù d'ar ribl dehoù. Nag Annwenn na Loeiza n'o doa c'hoant da vont da arvestiñ ouzh an dastumad armoù ha taolenoù kozh, met ar gwel a oa plijus gant amzer gaer ar Sadornvezh-se. Eüruzamant e oa chomet un dra bennak eus an amzer gozh pa oa bet distrujet Brest e-pad ar brezel 39-45, met n'eo ket ar pezh a zedenne ar merc'hed daouzek vloaz.

– Aet omp ? a c'houlenn Annwenn.

Dre forzh straniñ, o tremen eus ur rakstal d'eben, e oa nijet kuit imor teñval Loeiza. E ti Aogust, tost da goc'hu Sant-Loeiz, e wiskas Annwenn ur berukenn, ur fals-kof hag ur fals-fri ha hi ha mont er-maez eus ar stal en ur zirollañ da c'hoarzhin. E ti Dialogues e skwatjont ur gourvezvank e korn ar yaouankiz evit lonkañ un toullad bandennoù-treset. Goude-se ez eas Loeiza da ziskouez he skolaj d'he mignonez.

– A-boan brasoc'h eget ma hini eme Annwenn.

– Ha teir pe beder gwech nebeutoc'h a skolidi evit e Tsingoni, a ouzhpennas Loeiza. Du-hont e vezer mil en ur savadur a-boan brasoc'h !

Graet he doa an amzer he zro. E-giz-se e vez er mareoù eürus. An dristidigezh, ar gwalleur ne

vez fin ebet dezho war a seblant, padal, amzer an eürusted, na pegen berrbad eo ! Koñje a oa bet roet dezho betek dek eur, amzer a-walc’h da zistreiñ eus ar Celtic, sinema kozh karter penn nec’h straed Jaurès. Mont a raent war-draoñ kazel-ha-kazel en ur gontañ diwar-benn ar film. Dous e oa an noz. Gwez plasenn Keruscun a oa o delioù enno c’hoazh. Bep tro ma tremene e-bioù prenestri sklêrijennet ne veze ket Loeiza evit mirout outi da deurel ur sell en diabarzh.

– Plijout a ra din, emezi, dastum skeudennoù ar buhezioù a empennan dindan gouleier saloñsoù pe keginoù.

Ur pezh kazh du sourprenet a goachas dindan un oto.

– Sell ‘ta ! Iskis eo ! Gouloù zo e ti Helen Arzel !

Ne oa ket bet serret ar stalafioù, hag unan bennak en doa elumet ar gouleier.

– Ha perak eo iskis, a c’houlennas Annwenn, peogwir eo marv ar berc’hennez ? Un heritour bennak a c’hell bezañ e-barzh, neketa ?

– Ned a ket an istorioù susit ken fonnus-se, a respontas Loeiza, stad enni oc’h adlâret ar pezh he doa bet klevet, mizioù a c’hell padout.

– Pa vez luziet an traoù, marteze, eme Annwenn, met lâret ez peus din e oa ar vedisinez intañvez, hep bugale. Setu, perak ne vefe ket graet dija ?

Ya, perak ? Suzon he doa asuret e oa heritourez Helen hag e oa o c'hortoz e vefe digoret an testamant, met ne oa ket evit gortoz ma vefe kavet an drouklazher. Krediñ sonn a rae, hervez Loeiza, e oa bet lazhet he mignonez gant unan bennak, ha prouennoù e oa, hervezi. Ar fliked o doa kaset anezhi da sotal, met bet e oa dillo er maner ha kemeret an urzhiataer evit prouiñ dezho e oa ar wirionez ganti.

– Hi marteze zo deuet en-dro, a ginnigas Annwenn.  
– N'eus nemet un dra d'ober : gervel Suzon ha kelaouet e vimp. He niverenn am eus.

En ur fest-noz e Menez Are e oa ar vaouez, ha ne oa ket o furchal e ti Helen.

– Gervel ar polis zo dav deoc'h ober diouzhtu, n'eo ket reizh an traoù a lavaras da Loeiza.

– Gwelloc'h 'vefe e rafes-te, a embannas Loeiza, ma ran-me e soñjint ez eo ur bourd skoliadez.

Ur wech erru er gêr, c'hoant ebet ganto da vont da gousket.

– Ma c'halv Suzon ar polis, e vint erru a-benn dek munut, a lâras Loeiza da Annwenn, astennet war ar gwele. Fellout a ra din gwelet ar pezh a zegouezho. Ale ! War sav !

Hag int er-maez war beg o zreid, kuit da sachañ evezh Pierre ha Véronique, a oa o sellet ouzh ur film gant Almodovar, adskignet en tele.

Leternioù-straed 'oa penn-da-benn gant ar ru, tu ebet da goachañ nemet kluchañ a-dreñv sammorell un tredaner. Sklêrijennet e oa an ti bras betek al lamp a-us dor an talbenn.

Petra neuze? Un oto polis parket dirak toull dor an ti hag ur pennadig goude-se poliserien o tont er-maez eus ar jardin, ur paotr yaouank dalc'het ganto, o vlejal :

– Va zi eo, am eus lâret deoc'h ! Laoskit ac'hanon !

Kuzhet mat ma oant a-dreñv ar gamionetenn o doa gwelet an div vignonez pep tra.

– Gwelet ez peus, a lâras Loeiza a vouezh izel, pa voe aet an oto kuit. Al laer ! Du eo.

Ur vaouez, oc'h ober tro ar bodennoù, ur sac'had kokedennoù en he dorn, evit magañ ar c'hizhier gouez, a lâras « noz vat » dezho. Ne oa ket souezhet, war a seblant, o o welout div grennardez daouzek vloaz er-maez c'hoazh d'an eur-mañ noz. Hag int o tistreiñ da di Loeiza. Adserret oa e zaoulagad gant ar maner, sioul e oa pep tra er c'harter.

– Souezhusoc'h-souezhusañ eo an afer-mañ a lâras Loeiza en ur ziwiskañ he botoù.

– Ha perak 'ta ? a c'houlennas Annwenn o plezhenniñ he blev evit an noz. Peogwir eo du al laer, o lakaat ez eo ul laer ? Gouennelouriezh tout !

– Tamm ebet ! Ar c'hontrol an hini eo, dres ! Ha

petra a ra en istor ur paotr du oc'h en em lakaat da vestr an ti ?

Cheñchet e oa ar gaoz ganto a-benn ar fin : traoù all e-leizh o doa da gontañ evit adaptapout an amzer gollet. Kaer e oa an amzer an deiz war-lerc'h. Azezet kichen-ha-kichen war azezennoù liv flamboez, e oa Loeiza hag Annwenn o treuziñ kêr Vrest gant an tram. 'Evel ur veajig e oa, un euro ha tregont santim evit mont eus ur penn kêr d'egile. An endervezh a-bezh dirazo, a-raok lakaat ar vizi-tourez er c'harr-boutin war-zu Karaez. Mennet e oant d'ober o mad eus o amzer !

Kontet he doa Loeiza dre ar munud penaos he doa graet anaoudegezh gant Helen Arzel, an nebeud divizoù o doa bet asambles, ha penaos oa bet ken sabatuet o lenn en Télégramme keloù he marv dre zegouezh. Kontet he doa ivez an emgav droch gant Suzon. Kement-se a zedenne he mignonez a chome da selaou anezhi evit ur wech hep mont war he c'haoz. Eüruzamant e oa tost goullo an tram, kement a cholori a oa ganto pa oa Loeiza o kontañ krapadenn Suzon war ar voger, hag Annwenn daoubleget da c'hoarzhin, ken fentus e oa an arvest da empennañ.

– Soñj 'ta, ma vije bet degouezhet unan bennak warnomp pa oamp a c'haoliad war lein ar porrastell ? Diaes 'vije bet deomp displegañ e oamp o klask teurel ur sell ouzh wezenn-vananez ar jardin ?



– Gwir a lavarez, eme Annwenn en ur dorchañ he daoulagad. Moarvat eo ret furchal en amzer dremenet da amezegez bet. Daou dra nemetken zo da liammañ evit poent : bet e oa-hi o chom e Mayotte, ha du e oa bizitour dec’h. Gwall zister an elfennoù-se, ha ken buan all e teu ar paotr-se eus Kameroun pe Senegal.

An deiz war-lerc’h, e komiserdi kreiz-kêr, e oa aterset bizitour an noz gant an enseller Henaff. Anat dezhañ e oa ul liamm gant an enklask war marv an itron Arzel, setu perak e oa e karg eus ar goulennata. Dirazañ ur paotr yaouank, etre ugent ha pemp bloaz war ‘n ugent, bras ha moan, skuizhder un nozvezh fall war e zremm zu.

- Hoc’h anv, mar plij ?
- Hassani Fouad Bacar
- Deziad ha lec’h ganedigezh ?
- 5 a viz Ebrel 1990 e Miringoni.

A-sav e chomas ar poliser a oa o vizskrivañ an titouroù en urzhiataer.

An enseller a c’houlennas ur wech all.

- Pelec’h ?
- E Miringoni war enezenn Moheli.
- Mat. Digejit mar plij ?

Hag evel-se, betek ar goulenn meur : petra e oac’h oc’h ober e-kreiz an noz en un ti m’emañ e berc’hennez o paouez mervel ?



Diasur e oa ar paotr yaouank, war a seblant, o klask e c'herioù. Sellout a reas tro-dro ar burev, ouzh ar pentur liv koaven war ar mogerioù, stern ar prenestr kignet, kartenn ar bed peget a-dreñv ar burev.

– O klask paperioù e oan, a daolas.

– Ha ne oac’h ket evit gortoz an deiz ? Ken mal-lus-se e oa ?

Hag an enseller da genderc’hel.

– O vont dre laer en un ti didud e oac’h hag e fell deoc’h reiñ da grediñ din e oac’h o klask paperioù ? Ne ya ket an unan dreist ur porrastell e-kreiz an noz nemet gant mennozhioù vil e ve. Gouezet ho peus e oa didud an ti ha klasket laerezh bravigoù, kartennoù bank pe chekennoù, setu ar pezh a gredan.

– Tamm ebet, a huchas Fouad. Droad am boa da vezañ aze. Setu perak e oa ar gouloù war elum. Evel mab an itron Arzel e oan, n’ou ket ul laer.

– Gwelloc’h-gwellañ, a embannas ar poliser. Torret ho poa ar prenestr war an tu-dreñv. Ur mab o laerezh ti e vamm, ne vez ket gwelet alies. Gouest oc’h da brouiñ ho maberezh, ‘michañs.

– Nann ‘vat, a anzavas ar paotr, truek un tamm anezhañ. Evit se dres e oan bet en he zi.

– He mab oc’h ? Iskis eo memestra. Abaoe un toullad deizioù emañ o furchal en he buhez hag en he red micher, ha ne welan roud e-bet eus ur bugel. Ouzhpenn se, e 90, e oa o labourat en ospital e Roazhon ha n’eo ket e... Penaos e lavarit ?

– E Miringoni.

– Setu, e Komorez. Roud ebet kennebeut eus ur c’hoñje dezhi da vont du-hont.

– N’emaoc’h ket ganti ! En em anavezet e oamp pa oa deuet da labourat e Mayotte. Pevarzek vloaz

e oan ha ma c'hoar nav. C'hwec'h pe seizh vloaz a oa e oamp bet degaset eus Mohéli evit bevañ gwelloc'h war an enezenn c'hall. E ti hor c'hoar vras, Ayat, e oamp o chom. Matezh e oa-hi e ti an doktorez. A-wechoù, pa veze klañv Ayat, peotramant pa ne c'halle ket mont da labourat, e oa me pe Mounissa a gemere he flas. Ne felle ket deomp gwelet Ayat o koll he flas. N'eo ket gant he c'hopr evit derc'hel kef ispisiri ar gêriadenn teir gwech ar sizhun he dije maget an holl familh. Ret e oa dezhi mirout al labour-se, ha ret oa deomp sikour anezhi.

– An doktorez Arzel a oa a-du gant an dra-se ? Yaouank-mat e oac'h c'hoazh memestra, evit labourat !

– Da gentañ ne c'hoarveze ket alies, met e 2006, e oa bet dougerez Ayat, gevelled, ha diaes e oa dezhi. Setu, gant Mounissa ez aemp a bep eil pe asambles da gempenn rann di an doktorez. Ober war-dro an ti e oamp boas d'ober, n'he deveze ket tro da ober rebechoù.

– Hag evit ar skol ? Penaos a raec'h ?

– E gwirionez, e Mayotte, ar c'hentelioù a vez diouzh ar mintin dreist-holl. Mont a raemp di goude kreisteiz. Da zaou ez ae buan al labour.

– Ur mod iskis da sevel bugale, ne gav ket deoc'h ? a lâras an enseller en ur ambroug anezhañ, goude m'en doa Fouad lennet ha sinet e zisklêriadur. Heñvel e vefe kentoc'h ouzh seurt sklaverezh, din

da welet. Gwiriañ a rin kement-se. Met arabat deoc'h bezañ gwelet en ul lec'h 'seurt-se. Komprenet eo ?

Disammet e oa ar paotr pa oa en em dennet ken brav-se. Kemer a reas hent an ti-gar, oc'h en em c'houlenn hag-eñ ne oa ket o paouez hunvreal. Moarvat e oant bet ankounac'haet gant an doktorez, marteze he doa lâret gevier, zoken. Petra a lârf e da v/Mounissa ?

D'ar poent-se rik, e oa homañ o selaou komzoù lemm Moina.

– Eilañ a-ratozh-kaer ? Sot-nay out ? An hini wellañ out e matematik hag e fizik, ar gourc'hemmennoù a vez roet dit bep trimiziad abaoe ar skolaj. Sur out da dapout da vak gant ur meneg !

– Ha petra a rin eus ma bak gant meneg e Miringoni, a eilgerias Mounissa. Koulz ha me e ouiez e c'hallomp bezañ dastumet forzh peur pa vimp ouzhpenn triwec'h vloaz, hag adkaset d'hor bro c'henidik.

Kenderc'hel a reas, he mouezh o krenañ gant ar from.

– Sell : emañ o vevañ e ti ma c'hoar abaoe m'on erruet e Mayotte, dek pe unnek vloaz 'zo. Ankounac'haet-naet 'm eus ma c'hêriadenn orin, n'ouzon ket zoken hag-eñ emañ ma zud eno bepred, n'ouzon ket zoken ha bev int c'hoazh. Dle

am eus d'am c'hoar evit pep tra, setu e sikouran anezhi kement ha ma c'hallan, ha setu ! Tri bloaz zo emañ o c'houlenn paperioù, ha n'em eus netra c'hoazh. Nag ar gartenn-chom zoken ! An dra nemetañ a zalc'h ac'hanon eo ma skoliadur, hag emañ oc'h erruout er fin. Nav miz c'hoazh nemetken ! Majorez e vin dizale, ha goude-se e c'hell degouezhout forzh petra : gwiriadur identelezh, argasadenn. Kaset e vin en ur gêriadenn ma n'anavezan den ebet ken, ha petra a rin du-hont ? Dimezet e vin, moarvat. Gant unan kozh, pe ul labourer-douar paour ha n'anavezan ket zoken. Fellout a ra din chom e Mayotte ha kenderc'hel gant ma studi.

– N'eus diskoulm all ebet ? a hirvoudas Moina.

– Geo, unan nemetken : kaout ur bugel gant ur gwaz en deus ar vroadelezh c'hall hag a rafe ac'hanon mamm ur bugel gall.

– Ha perak pas ? a c'houlennas Moina. Gwelloc'h e vefe ganin kaout ur bugel evit bezañ kaset da Gomorez. Ouzhpenn-se, gant ur bugel e c'hallez derc'hel gant ar studi.

Ur sell leun a fiziañs a dremenas etre an div blac'h yaouank. Kement a amzer o doa dirazo evit genel ur bugel salver hag evit tapout o diplom fin o studi.

\*

– Kavout a ra din n'eo istor Fouad nemet ur goñchenn, a lavaras pelloc'h an enseller Henaff

d'e eiler, met souezhadennoù zo da gaout c'hoazh marteze. Ur goulenn mat evit kregiñ ganti : mard eo bet ret d'ar paotr-se terriñ ur prenestr evit mont e-barzh, ha ma n'eo deuet a-benn da dapout netra, piv a zo un alc'hwez gantañ hag a vefe deuet da laerezh an urzhiataer ?

\*

E penn all ar bed e oa Nakchami o sevel goustadik gant ar wenodenn serzh, ur pezh balod dilhad kempouez ganti war he fenn. Gwelet he doa Fanny, e penn kentañ an endervezh, pedet gant houmañ ur guchennad mignoned da vont da ebatall en he foull-neuial, keit ha ma vefe-hi war bord ar stêr, ha n'eo evit kouronkañ met evit kannañ kouez he familh. Koulskoude, en ur zistreiñ war he nañv, e splanne ar plac'h yaouank gant al levenez. Ur eur kentoc'h, e-keit ha ma oa o skeiñ a-zevri-kaer war ur sae liesliv astennet war mein plat ar stêr, e oa bet desachet he sell gant ul luftr en dour. Ur maen lugernus, pe stouv ur voest bier ? O splujañ he dorn en dour fresk he doa tastornet ar foñs. Gant birvilh ur c'hlasker aour he doa tennaet ur pezh daou euro. Daou euro ! Trawalc'h evit gellout kas tri lizher da Vro-C'hall da vihanañ. Dezhi e oa an arc'hant-se, gounezet he doa anezhañ gant priz he zeir eurvezh hir daoulinet war bord an dour, dindan touforenn an endervezh gor a-walc'h da sec'hiñ ar bern dilhad-se a-raok m'he defe echu da

astenn anezhañ war ar geot sec'h hag ar bodennoù. Ne vern ma vefe bet tu da brenañ dek galetezenn riz digant Faouzia gozh, a veze o werzhañ bep mintin e-kichen an ti-post.

An deiz war-lerc'h e asantas Fanny profañ ur golo-lizher dezhi, hag e adkopias, 'vel war ar patrom he doa resevet, an anvioù iskis-se hag ar sifroù. *33 Ru François Rivière, 29200 Brest.*

\*

Annwenn a oa aet d'ar gêr. Adkroget e oa ar vuhez gant he lusk tristik hag enoeüs.. Nijal a rae soñjoù Loeiza eus Tsingoni d'an Oriant, ma wellae ken mat yec'hed he mamm. Da c'hortoz adwelout anezhi e oa bet ret kemer hent ar skolaj, ha bemdez bremañ e veze kentelioù 'pad an deiz, ha pourmenadennoù gant Monday.

War-dro seizh eur, o kregiñ gant ur boelladenn latin, e oa bet direnket a-daol-trumm gant soniri he zelefon.

– Allo Loeiza ? Suzon eo !

Ac'hanta! Petra a felle da homañ c'hoazh ? Ne ouie ket o devez ar skolajidi labour en abardaez ?

– O tirenkañ ac'hanout emañ, a gendalc'has Suzon, met ezhomm 'm eus ac'hanout. Ha moaien vefe en em welout hepdale ?



Abaoe an deiz kentañ e ostaleri ar Blasenn o doa divizet mont dre « te » an eil ouzh eben. « Kenseurtezed omp bremañ », he doa ouzhpennet Suzon en ur vousc'hoarzhin.

« Pas 'raok dimerc'her » a respontas Loeiza.

Da noz ned an ket er-maez, met an deiz-se n'em eus ket kentelioù goude kreisteiz, libr on betek c'hwec'h eur. Fellout a ra d'am zad kavout ac'hanon er gêr pa zistro eus e labour.

– Tremen a rin da gerc'hat ac'hanout, ma fell dit ?  
– Mat eo din, amzer din leinañ, ha gwelet a rin petra e vin gouest d'ober evidout.

Setu ma oa lakaet an emgav da ziv eur hanter d'ar Merc'her. Pa zeuas an eur, e c'hortoze Loeiza e-ser klask empennañ petra e vije bet oc'h ober d'an eur-se e Combani. Moarvat e vije gourvezet en he gwele-skourr o lenn un toullad mangoù. Nemet e vije bet pedet gant Fanny da ebatall er poull-neuial ha da evañ ur banne chug-frouezh fresk prientet gant he matezh ?

- Diaes eo din implijout an urzhiataer, a lâras Suzon dezhi ur pennad goude-se. Evidout, bet ganet gant ul logodenn ez torn, n'he deus ket ar mekanik-mañ sekred ebet moarvat.

Poket he doa dezhi evel pa vijent bet mignonezed a-gozh. Gwisket e oa he c'horf lart gant ur sae hir kotoñs liesliv, 'pezh a roe neuz ur

valafenn dezhi. C’hwez vat ar jesmi a oa ganti, hag ar porfum mezuus-se a blijas da Loeiza.

– Program files pe All users zo ‘vel gregach evidon, a gendalc’has Suzon, pa oant war hent Rekourañs. N’ouzon ket penaos ‘vez distaget, n’ouzon ket petra emañ o klask, ha gwashoc’h, n’ouzon ket pelec’h klask.

Div eur goude-se he doa komprenet ar plac’h yaouank dre vras penaos e oa renket titouroù Helen. Un doser bep bloaz, un is-doser evit pep tem : tailhoù, beajoù, fakturennoù. Ar memes tra evit ar fotoioù, renket dre zeiziad, dre lec’h pe zarvoud. Diskouez a reas d’ur Suzon saba-tuet penaos ober gant an alc’hwezioù USB, ken bihan ma z int, ha plas warno da lakaat doseroù a zegadoù.

– Ret eo din mont d’ar gêr a lâras Loeiza war-dro 6 eur.

Merenn-vihan fonnus a oa bet servijet dezhi gant Suzon en he c’hegin vihan livioù gwenn ha ruz dezhi. Kek gant frouezh koñfiz, chug orañjez, chokolad tomm, tra-walc’h da drugarekaat anezhi evit he strivoù stlennegel, met un horolaj, nadozioù dezho stumm ul loa hag ur fourchettez, a zegase d’he soñj he deverioù-skol.

– Gouzout a ri ober bremañ ? a c’houlennas, he

genoù hanter-leun a gouign. Daou alc’hwez USB hag ur bladenn galet a chom da lenn c’hoazh.

– Ya, ya, betek an disterañ fichennaoueg e lennin. Ul listenn a rin war ur c’haier zoken. Me, eo ret din ober gant ur baperenn hag ur c’hreion evit en em dennañ. Un afer oad, moarvat.

– Petra dres emhout o klask ?

– Merkoù da gompren petra he doa graet Helen evit lakaat unan da lazhañ anezhi.

– ‘Vel petra da skouer ? Peogwir ez peus lakaet ac’hanon er jeu o laerezh ar mekanik-mañ, eo dleet dit lâret hiroc’h din.

Fent a oa en he daoulagad pa sellas Suzon ouzh Loeiza.

– Evit sikour ac’hanon da vat, pe evit magañ kuriusted emhout o c’houlenn se diganin ?

– Un tamm a bep hini, ‘gav din.

Ur wech erru er gêr e kavas Loeiza ul lizher war hec’h anv war taol ar gegin. Mall bras a oa warni tapout ur gontell evit tennañ un toullad follennoù kaier er-maez !

« *Loeiza ger*

*Teir sizhun zo dija emeon o c’hortoz ac’hanout !  
Glav ar mangez a zeuio dizale evit reiñ buhez d’an  
holl wez-se, hag emichañs e vi amañ pa zegouezho ar*

*frouezh. Ma mamm he deus feurmet ur park bihan, hag hon devez kement tra a fell deomp : bananez, maniok, tomatez. Ur wezenn-vara hag unan vangez a zo ivez. Dreist eo ! 'Pezh ne vez ket debret a vez gwerzhet ha n'hon eus ket aon ken da zioueriñ, ha pa vefe serret ar stalioù gant an diskrog-labour 'vel warlene. Hir e kavan ma amzer er skolaj hepdout, ha mall zo warnon gwelout ac'hanout en-dro evit displegañ al latin din. »*

Gant he skritur moan e kendalc'he Nakchami da gontañ war div bajenn kaier eus he c'hoarezed vihan, eus he zad na wele ket ken, ha gwell a se, eus he notennoù ha na oant ket fall. Loeiza a empenne anezhi, 'vel en devezh kentañ, gant he flezhennoùigoù diniver fichet gant stirennoù liesliv, he c'hroc'hen teñval hag he zongoù plastik glas. Eürus e oa-hi o welet ne oa ket ret ken da Nakchami degas eus ar skolaj he sandwich pemdeziek evit rannañ anezhañ er gêr, hag he doa amzer evit skrivañ dezhi.

\*

Tremen a reas an amzer, miz Gwengolo a oa o vont e-bioù, sioul.

Imoret mat e oa Suzon an deiz-se. A-drugarez da gentelioù Loeiza he doa digoret holl zoserioù, isdoserioù ha titouroù an urzhiataer hag an alc'hwezioù USB. Labourus e oa bet, dizampart

e veze he biz war an douchennaoueg, met lennet he doa an holl lizheroù skannet, istoradur an eskemmoù, hag an holl bosteloù. ‘Vel ar re all, he doa kuzhet Helen he c’herioù-tremen e-kreiz un doser rekipeoù. En ur lenn betek penn e oa deuet Suzon a-benn da doullañ ar sekred. Ha bremañ, azezet ouzh taol ar gegin, ur sigaretenn en he dorn, e oa Suzon o lenn he notennoù. ‘Vel m’he doa lâret da Loeiza he doa muioc’h a fiziañs er stilo eget en deknologiezh. Diwezhatoc’h e voullfe, poent e oa adlenn.

E-touez an teuliadoù e oa unan anvet Fouad Bacar . Hemañ a oa kroget da skrivañ da Helen e miz Du 2009.

Un toullad divizoù ordinal.

Hi : « N’eo ket re ziaes dit en em ober e Bourdel ? »

Eñ : « Re yen. Keuz am eus da vezañ deuet amañ. »

En em chalañ a rae ar paotr abalamour ma oa bras kêr Bourdel e-keñver kêrioù Mayotte, abalamour ma veze prez war an dud. Dioueriñ a rae e familh. Klask a rae Helen lakaat anezhañ da gemer pasianted, da c’hortoz ar vakañsoù a gasfe anezhañ d’ar gêr (gant ma vefe erruet yalc’hadoù ar C’huzul Meur). Komz a rae eus an amzer ret evit en em vozañ ouzh Bro-C’hall, ouzh ar c’horn-bro.

E miz Meurzh e skrive Fouad dezhi :

« *Ha kemeret ho peus un diviz evidomp hon-daou ?* »  
Respont : « *Mont a ra an traoù gant o hent.* »

Mizioù hir goude-se hep netra, hag ur postel all gant Fouad :

« *Re ziaes eo ! Perak ne zalc'hit ket d'ho promesaoù ?* »

Hag Helen da respont : « 'Pezh on gouest d'ober a ran. Dit-te da c'houzout n'on ket mestrez war gorregezh ar Melestradur. »

Skrid ebet goude-se, na war Facebook, na dre bosteloù. Dianket ar paotr.

\*

O labourat e oa an enseller Henaff gant e eiler, er burev e lein e di. Diwezhat e oa. Oc'h adlenn notennoù e oa an daou zen. Unan a oa yaouank, egile 'oa kozh. Disheñvel e oant a neuz, kement hag a gorf hag a zoare, ne oa 'nemet un dra voutin etrezo : mennet-groñs e oant da gas o raksantoù betek penn, ken dister e vent.

– Petra eo da soñj ? a c'houlennas Cervione, pouez-mouezh Korsika gantañ c'hoazh daoust d'e zaou-ugent vloavezh bet o labourat war an douar bras.

– Laeroñsi hep freuz, marv hep merkoù feulster. Penaos dirouestlañ ar gudenn-mañ ? N'hon eus poent loc'hañ ebet.

Huanadiñ a reas Henaff. Mantret e oant gant pouez al labour.

– Taolomp un taol troad er grugell-verien, a ginnigas-eñ. Adalek warc’hoazh e vo lakaet an holl war ar glaou ruz. Da gentañ penn emañ an heritourez kozh o klask reiñ da grediñ deomp eo bet drouklazhet he mignonez. Ma oar un dra bennak, m’en tou, e tisonko an tamm. Ha lakaet e vo ur skipailh da ensellout pep santimetr en ti. Me ma-unan marteze n’em boa ket gwelet bep tra.

Hag evel-se e voe graet !

E rrandi Suzon en em gave Ronan Henaff.

Daoulagad glas-gwer an enseller a baras pizh war ar vaouez azezet dirazañ. Ne soublas ket hi he daoulagad. « Hi an hini zo deuet da gentañ da hejañ ac’hanon », a soñje ar poliser. Arabat soñjal dousaat anezhi gant mousc’hoarzhoù. Ur wech graet he soñj ganti, ne cheñcho ket meno evit doare.

– Moarvat en em rentit kont n’ho poa droad ebet da laerezh an urzhiataer-se. Ne oa ket bet gwirieket an afer gant an noter c’hoazh. Pep tra a ranke chom en e blas.

– Gwelet a-walc’h e vez petra eo evezh ar polis, emezi prim. Ma n’em bije ket lakaet an urzhiataer-se a-gostez, ar c’hentañ laer en dije kaset anezhañ gantañ. Gant piv e oa bet kaset keloù deoc’h pa

oa bet ul laer en ti ma n'eo ket ganin ? Setu perak  
emaoc'h o klask jeu ouzhin, an hini nemeti o klask  
kaout ar wirionez war marv Helen ?

– Ma eiler ha me hon eus prederiet en noz-mañ,  
hag un toullad traoù iskis hon eus merzhet en afer-  
se. Mard emañ ez eo evit klask gwelout  
sklaer. Da gentañ, lezit ho min dismegañsus a-  
gostez ! Anzavet ho peus laeroñsi an urzhiataer.  
Evel laerez 'vefe moaien din kas ac'hanoc'h dirak  
ar Justiz.

– Evit gourdrouz, goulennata pe herzel ac'hanon  
ho peus divizet dont du-mañ ? Setu, savit ho kou-  
lennoù! Arabat soñjal e kinnigin ur banne kafe  
deoc'h ouzhpenn.

Mousc'hoarzhin a reas Ronan Henaff.

– Siwazh din, c'hwez vat zo er gegin amañ. Lâret  
'vefe c'hwezh kouign chokolad.

– Ma lâran deoc'h 'pezh a ouzon, e reoc'h keloù  
din pa vo ?

– Un seurt drouktunerezh eo, neketa ? N'eo ket  
gwall vrav. Disoc'hoù hon enklaskoù a zo sañset  
chom kuzh.

– Ha petra 'm bo en eskemm evit se ? emezi en  
ur zegas war ur bladenn daou dasad kafe ha div  
lodenn kouign blot gant skolpennoù chokolad.

Un eurvezh goude-se e serras an enseller e  
garnedig hag e savas. Kaset he doa Suzon ar  
restachoù d'ar gegin. Chom a rejont aze ur pennad



hir, grik ebet etrezo, e sioulder ar saloñs teñvalaet gant skeudoù an noz.

– Ret e vo fiziañ an urzhiataer ennomp koulskoude...

– Kalz a draoù prevez zo ennañ ha ne fell ket din lakaat anezho dindan lagad forzh piv, hor fotoioù vakañsoù da skouer. Empennañ a c'hellan ho kaozioù diwar-benn hon dilhad-kouronkañ..

– Prometiñ a ran deoc'h ne vo den all ebet oc'h implijout anezhañ, ha ne lakain ket ma fri en hoc'h eñvorennoù.

Asantiñ a reas Suzon ha mont 'maez ar saloñs evit distreiñ, urzhiataer Helen peg ouzh he c'halon.

Plijout a rae d'ar poliser ar ranndi bihan-se, livioù tomm dezhañ. Donezonet eo-hi evit ar plant, hag ijinus evit kinklañ. Met piv a c'hallje lâret n'he doa ket c'hoant en em staliañ er maner ? He retred gwerzherez-botoù ne oa ket uhel, hag an heritaj-se a oa ur burzhud eviti. Poan en doa koulskoude empennañ anezhi o vountañ he mignonez er porzh evit pakañ he feadra buanoc'h. Gwirion e oa bet he glac'har, gwelet 'veze he from ha kompren a rae he c'hounnar pa ne veze ket selaouet gant ar boliserien. Ret e vefe dezhañ koulskoude lakaat ur sell war he c'hontoù. Daoust ha kudennoù arc'hant he doa ?

– En em daolet eo Helen en ur sapre toull-gwesped, sur on, a c'hiboudas-hi. Unan bennak en

doa krog warni.

– Emaoc’h o soñjal er studier yaouank-se ? Hervezañ he doa prometet an doktorez Arzel reiñ sikour dezhañ. Peseurt sikour ? Ur yalc’had evit paeañ e studi ? Ur bern arc’hant evit bezañ bet korvoet e c’hoar hag eñ, pa oant bugale pe krennarded ?

\*

« N'em eus ‘met daou viz ken da dremen er skolaj-mañ, a soñje Loeiza. An holl gelennerien a oar emañ o tont eus Mayotte hag em eus da vont di en-dro goude an Hollsent. »

Merc’h kelenner e oa, hi ivez, anavezout a rae mat-tre ar flaperezh a veze e sal ar gelennerien, (al lec’h sakr-se ma en em ziwalle ar skolidi dioutañ). Darn n’o doa graet evezhiadenn ebet. Darn all, er c’hontrol, a glaske tennañ gounid. Hini an istor-douaroniezh a bouezas kement ma asantas Loeiza ober un displegadenn. Ne oa ket gwall ziaes dezhi. Dindan ur c’hardeur e tresas poltred marvailhus pe dost enezenn ar porfumoù. Komz a reas eus ar parkeier ylang-ylang, o frond pa serr an noz, eus an traezhennoù sabl du, gwez baobab ramzel en o hed, eus an tier-debriñ war bord an hent ma vez debret gant an dorn eskell yer ha pennadoù maniok fritet. Plijadur he doa menegiñ dourioù tomm al lagon ma ‘z a ar Re Wenn da neuial e-touesk baoted ha delfined, taolenniñ kaerder ar

maouezed gant o dilhad hengounel liesliv ha skañv, displegañ kan ar muezzin o c'hervel d'ar bedenn kerkent ha tarzh-an-deiz. Arabat ober an disterañ meneg eus pezh en doa feuket anezhi warlene, ar vizer, ar feulster, al loustoni.. En ur ober bloavezh eno he doa desket Loeiza ne weler biskoazh 'met un doare eus an traoù.

En ur gomz e wele daoulagad trellet he c'he-neiled o doa avi outi, hi prest da zistreiñ e baradoz ar gwez-bara hag ar makied farsus.

En devezhioù-se e kasas ul lizher da Nakchami...

*« Arabat dit digalonekaat ! Chom a ra pemp sizhun a-boan. Gwelloc'h emañ kont gant ma mamm hag emaomp o vont da zistreiñ. C'hoarzhin a ri : soñj 'ta 'm eus lakaet ma fri en ur sapre istor. Kontet 'm boa dit c'hoazh penaos e oa bet beuzet ma amezegezh e porzh Brest. Sell, emañ ar polis o kenderc'hel gant e enklask. Ret eo krediñ n'eo ket sklaer. An deiz all o doa tapet ul laer en he zi. Gwir, lâret 'vefe bet unan a v/Mayotte ! Ha gwashoc'h se : unan eo, gouezet 'm eus gant ma mignonezh Suzon e oa anvet Fouad hag emañ o tont eus Combani. Ur c'hoar en deus e lise Sada. Soñj 'ta ! Ken buan all ec'h anavezvez anezhi. A-hend-all, amañ emañ an diskaramzer, ha cheñch liv a ra delioù ar gwez. Ruz pe orañjez e teuont da vezañ, brav-kenañ eo. Ober a rin fotoioù evit diskouez dit. »*

Ne oa ket Loeiza du-hont evit gwelout mousc'hoarzh Nakchami pa resevas he lizher. Anavezout a rae Mounissa evel-just ! Combani n'eo nemet ur gêriadenn vras kludet war-lein an torgennoù, hag an holl en em wel bemdez. Er marc'had, en ti-post, war bord ar stêr. Ar maouezed a oar displegañ piv zo mab pe merc'h da biv (ha luziet e vez gant al liespriediñ hag an darempredoù kuzh), eus pe gêriadenn ha pe enez e teuer. Eskemm a reont keleier forzh pelec'h en em gavont. Un drougober ne chom ket digastiz e-pad pell er c'hêriadennoù rak gwelet e vez pep tra.. Alies a-walc'h e oa bet Nakchami o c'hortoz e stal nemeti ar gêriadenn evit anavezout Ayat hag a veze o terc'hel ar c'hef eno teir gwech ar sizhun, ha gant Mounissa he doa bet kaozet meur a wech e porzh ar skol-vamm pa 'z aent da gerc'hat breudeur, c'hoarezed pe nized.

\*

– Soñj 'ta, a c'hrozmolas Cervione, e peseurt lagenn emamp oc'h en em zifretañ. Unan a v/ Mayotte e-kreiz an afer. C'hwez an arc'hant a vez klevet war meur a vil kilometr, 'm eus aon.

- Fulor Fouad a c'hellan kompren, a lâras Henaff, en ur chom a-sav gant e skrivadenn war an douchennaoueg. Treitouret oa bet gant ar vedisinez, hag o klask kompren perak e oa.

Daoust dezhi bezañ daouzek vloaz nemetken e oa lemm spered Loeiza. Suzon he doa pedet anezhi en ur saloñs te, e kreiz-kêr, evit kelaouiñ anezhi war ar pezh he doa klevet, evel prometet. Sammet he doa anezhi en istor-se, hag evit kaout he lod, he doa divizet start ar plac'h yaouank klevout pep tra.

– Marteze e skrivin romantoù polis diwezhatoc'h emezi, ret eo din pleustriñ.

– Ret e oa din komz ouzhit, a anzavas Suzon. Goulennataet on bet gant ar boliserien, ha roet em eus dezho da c'houzout e oas bet ganin en ti.

– Hag evit bezañ pardonet da vezañ flatret ac'hanon eo, emaut o kargañ ac'hanon gant tartezennoù sitroñs ? a grias Loeiza, fuloret.

Suzon a zirollas da c'hoarzhin.. He divjod lart a grene, he c'hof tev a zarlamme dindan he c'horfenn wer ledan.

– Arabat dit fuloriñ e-giz-se. An noter en deus asuret din e oan heritourez Helen. Mont d'e vurev 'm eus d'ober evit sinañ paperoù, met 'n eus rebech ebet d'ober din. Laerezh va zraoù din am eus graet, n'eo ket difennet !

Loeiza a zantas en dartezenn sitroñs.

– Gellout a ri dilojañ neuze. Ur cheñchamant bras e vo evidout.

– Ne vo ket diouzhtu, hervez an noter.

Kontañ a reas dezhi dre ar munud tout ‘pezh e oa-hi o paouez gouzout diwar-benn Fouad.

\*

E penn all ar bed e oa Mounissa fulor enni. Ne zeue ket a-benn da zivizout drastañ he bloavezh klas termen a-boan kroget ganti. En he spered e wele dremmoù an holl re a oa bet argaset ha na oant bet distroet biskoazh eus Komorez.

Pemzektez kentoc’h he doa bet un tabut taer gant ur paotr yaouank, Saïd Alaoui e anv, breur-kaer Ayat. Abaoe un nebeud mizioù e troe en-dro dezhi, o tont dibaouez da di Mounissa hag o klask stekiñ outi. Hegaset-spontus e oa ar plac’h yaouank gantañ.

– Mann ebet d’ober, a lâras da v/Moina. Soñj ‘ta : kinniget ‘n deus din dimeziñ gantañ. Aon a ra din an ide-se !

– Ret eo dit gouzout petra a fell dit, a eilgerias he mignonez. Gall eo, din da c’houzout. Dirouestlañ a rafe da holl gudennoù.

– Mersi bras, a respontas Mounissa. Kemer anezhañ, te, ma fell dit kaout ur gwaz gant paperoù ofisiel. Diot ha divalav e kavan anezhañ!

– Koulskoude, a gendalc’has Moina, dleet e vefe dit soñjal hiroc’h a-raok mont d’ober da hini faro. Aesoc’h eo en em sachañ ouzh an dimeziñ evit sevel ur bugel bet graet dre ret.

Mounissa a reas ur c’hruz d’he skoaz.

– Deus ganin d’an ti-bara kentoc’h, e-lec’h c’hoari da wazhwelerez. Dit da c’houzout, pa zimezer gant ur Gall, n’eo ket dre gomzoù e vez dibriedet. Da waz a c’hall nac’hañ resteurel da frankiz dit, ha c’hoazh, o lakaat e vefe a-du, e vez ret kaout un alvokad. Ur varnedigezh a vo. Talvezout a ra pemp bloaz pasianted a-raok ma rofe an dimeziñ ar vroadelezh dit. Dimeziñ gant an teureug a Saïd Alaoui-se ha sentiñ outañ ‘pad pemp bloaz, kompren a rez an euzh ?

**D’an 21 a viz Gwengolo.**

O tistreiñ eus ar skolaj e oa Loeiza. En em deurel a reas war gourvezvank ar saloñs, ur vananezenn en he dorn, ha dirazi war an daol izel, e-kichen un tasad chokolad tomm, dindan lagad avius Monday, un hanter dousennad choko BN sivi, he re gwellañ-kavet. Div eurvezh sport hag an hent war velo goude-se o doa degaset naon dezhi, hag un ehan a rae a-raok kregiñ gant he deverioù. En em voazañ a rae a-benn ar fin d’an ti-bihanse e kêr, ken disheñvel diouzh hini Penn-Ti Ruz ha muioc’h c’hoazh diouzh o ranndi e Combani. Gouezet he doa Véronique ober ul lec’h degemerus eus an ti, lakaat da glotañ plantennoù ha livioù dous. Un daolenn vras a ginkle ar voger a-dal dezhi : serr-noz o kouezhañ war ur raoskleg. Deuet e oa a-benn an arzour da skeudenniñ kridienn ar

garennoù en avel. Plijout kalz a rae da Loeiza. Pa erruas he zad d'ar gêr, un eurvezh goude-se, e kavas e verc'h pladorennet e-giz-se, o sellout ouzh un heuliad skinwel amerikan.

O tiskargañ un tasad kafe e oa Pierre pa dintas kloc'hig an nor.

– Kae da zigeriñ, mar plij, a c'houlennas an tad.





Ar plac'h yaouank a savas diwar ar gourvezvank en ur c'hrozal abalamour d'he stirad tele muiañ-karet hag a yeas da zigeriñ an nor. E toull an nor, ur paotr yaouank blev melen, mistr, oad he zad pe dost, a c'houlenas outi :

– Demat ! Loeiza Merser oc'h ?

Asantiñ a reas.

– Da gaozeal ganeoc'h am eus. Mont a rin tre ?

Eus ar gegin e c'halvas an tad :

– Loeiza, piv eo ?

– Ar polis, Aotrou, a respontas an den. Letanant Henaff.

Ha bihan kalon Loeiza. « Ac'hanta ! Emañ an trubuilhoù o vont da gregiñ ». Gaou he doa lâret Suzon, n'he doa ket droed da vont en ti, ha Loeiza a oa kenlaerez. Pe riskl a oa ? Al lez-varn evit ar vugale ? An ti-kastiz ? An toull-bac'h evit ar re dindan oad ? a soñjas, buan.

Tostaat a reas an tad, tres nec'het warnañ.

– Ar polis ? Deuit tre me ho ped !

Mont a rejont d'ar saloñs. Loeiza, soublet he fenn, o sellout pizh ouzh beg he chaosonoù, ar flik war he seulioù. Adkemer a reas he flas war ar gourvezvank, sonn he c'hein ar wech-mañ. Keit

ha ma oa bet e toull an nor, en doa graet Monday e vad eus ar chokooù. Ne chome nemet ur vruzhunenn bennak, hag eñ da chom hep sellout ouzh Loeiza. Hi, padal, a ziwalle da sellout ouzh ar poliser. Azezet a-zehoù dezhi e oa kroget hemañ da gontañ kaoz gant an tad. Biskoazh ne vefe bet lâret ur poliser. Heñvel ‘oa ouzh marc’hadour levrioù eil dorn ar c’harter ma oa boas Loeiza da vont da furchal en e stal evit dispakañ mangaoù marc’had-mat. Bragoù jean, sweat du gant ur c’habell, botoù-basket uhel, dilhad ur paotr koul a oa warnañ. Koulskoude e oa-hi fromet gantañ. E zaoulagad glas a seblante lenn a-dreuz an dud, ha just a-walc’h he doa-hi re a draoù da guzhat evit ma vefe lennet enni. Petra ‘lârfe he zad pa glevfe avanturioù nevez e verc’h ?

– Arabat pennfolliñ evit netra. Un enklask ordinal eo, emezañ da b/Pierre. Gouzout a reomp ec’h anaveze ho merc’h an doktorez Arzel hag un nebeud goulennoù am befe d’ober outi.

An tad a daolas ur sell goulennus ouzh e verc’h. En ur ober pemzek munutenn bennak e klevas an enseller Henaff penaos he doa graet Loeiza anaoudegezh gant Helen, ‘pezh a oa bet lâret etrezo.

– Ur c’hi ‘m eus me ivez a anzavas. Ur pezh ki rodellek bennak, diot, hag a vez dalc’hmat o klask mont er-maez. Spontus eo gwelet gant pet a dud a vez kejet eus ur c’hlazenn d’eben.

Loeiza ne roas ket da c'houzout re a draoù dezhañ. Ya, an dud pa bourmenont ar chas a gomz eus chas. Setu ar pezh o doa graet Helen hag hi. Hag eus Mayotte ivez. Netra gwall interesant e gwirionez. Ne oa ket neuz trabaset warni, er c'hontrol, tres distennet, eürus da vevañ en un endro blijus. Ma vije bet raktresoù pe gudennoù ganti moarvat n'eo ket en ur grennardez he dije fiziet anezho, a lâras d'ar poliser.

« Evel-just, a soñjas al letanant en ur deurel ur sell warni. He zad ne ouie ket petra he doa graet gant Suzon. Tommañ a rafe divskouarn Loeiza a-benn nebeut, marteze. »

Saveteet e voe ar plac'h gant sonerezh an telefon. Ouzhpenn er filmoù e tegouezh, sellit ! Keit ha ma oa he zad o vont er-maez evit respont, e vousec'hoarzh an enseller dezhi.

– Chom dizaon ! Ne lârin netra ouzh ar vizit e ti an itron Arzel. Gwelet 'm eus da « geneilez » ha didamallet he deus ac'hanout penn-da-benn. Ma felle din komz ganit e oa abalamour da v/Mayotte ha n'anavezan tamm ebet. Kavet 'm eus titouroù war internet, lennet 'm eus pennadoù kazetennoù, ha soñjet 'm eus e vefes gouest da reiñ an dorn din.

« Sikour ar polis ? Waou ! Loeiza poent dit diskenn diwar da blanedenn », a lâras dezhi hec'h-unan, en ur sellout outañ gant daoulagad digor-bras.

Er pezh all e veze klevet mouezh Pierre o kaozeal ouzh an telefon. Kenderc'hel a reas an enseller :

– Mignoned 'peus du-hont moarvat , hag evel an holl en ho rummad oad, e tremenont ul lodenn eus o amzer war Facebook pe Messenger, ouzhpenn o fosteloù. Kavout a ra dit e vefe tu da c'houlenn diganto adkavout Mounissa, c'hoar Fouad ? Tud dibaper n'o deus chomlec'h ofisiel ebet, ha n'em eus tamm c'hoant ebet da vont e darempred gant polis Mayotte evit poent. Goude bezañ klevet hec'h istor kontet gant he breur, e komprenan mat petra a santfe ar plac'h yaouank-se o welout beg-o-zog dirak he dor.

Soñjal a reas Loeiza e Nakchami ha n'he doa nemet paper he c'haieroù evit skrivañ dezhi, hag ar gwenneien treut a lakae a-gostez evit an timbroù. Kontet he doa dezhi istor an daou euro o doa paeet he lizheroù kentañ, ha Loeiza he doa soñjet en hini bet taolet ganti e feunteun Rumengol da geñver ur gouestl.

Nakchami a gavfe Mounissa. Met gant Fanny eo e oa internet evit bezañ kelaouet buan.

– Ha neuze, a c'houlennas ar poliser, goude m'he doa prometet dezhañ lakaat he mignonezed da zispenn roudoù Mounissa, n'ho peus kavet netra all 'met eskemmoù Facebook ha posteloù en urzhiataer ? Amzer c'hounezet e vefe evidon ma 'z

pefe un titour bennak da reiñ din.

– N'em eus ket gwelet an holl, a lâras Loeiza. Displeget 'm eus da Suzon penaos furchal en dra-se. An doser kentañ a oa anvet « advabañ ». Souezhet on bet un tamm gant se. Setu perak 'm eus dalc'het soñj.

– Advabañ, emezout ? Emaon o soñjal en un dra bennak, emezañ en ur sevel. Mard eo mat dit e c'halvin ac'hanout a-benn un nebeud deizioù evit gouzout hag-eñ 'vo bet digourdi klaskerien yaouank Mayotte.

D'ar poent-se dres e oa an tad o skourrañ an telefon en-dro.

– Ha merzheriet eo bet an divergont-mañ ganeoc'h evit lakaat anezhi d'anzav ? a c'houlennas en ur flourañ blev du Loeiza.

– Pennek eo, a respontas an enseller. Dont a rin en-dro gant ma ostilhoù.

Hepdale e skrivas Loeiza da Fanny. Ar postel a zisplege pep tra. Ma asante kemer perzh er c'hlask, eo e-touez tud kuzh ha dibaper e oa da furchal, ha nompas e-touez ar re binvidik e oa boas da zaremprediñ. Fanny a gomprenas mat-tre hag he respont a zeuas pront :

– Mat eo ! Goulenn a ran gant Nakchami klask titouroù ha degas anezho din.

Daoust ha feuket e oa bet Fanny? Moarvat, met re fier e oa evit en anzav. Biskoazh ne lezfe

unan a v/Mayotte da zont en he zi, he doa lâret da Loeiza warlene, spontet ma oa bet o klevout e teue Nakchami da di Loeiza war-lerc'h ar skol. Eus he ferzh, neuze, e oa ur gwir brouenn a vignoniezh mont da gomz gant honnezh hag asantiñ bezañ al liamm etrezo o-div.

Loeiza a drugarekaas Fanny a-greiz kalon. « *Te ivez a ra diouer din* » a skrivas Loeiza dezhi. Ma 'z eo gwelloc'h flourañ brav ar c'hazh, 'vel lâre he mamm-gozh, ne lâre gaou na d'an eil na d'eben.

### **D'an 21 a viz Gwengolo – Mayotte.**

Ur wrez spontus a oa ar Gwenervezh-se. Ar makied a c'hortoze ar serr-noz evit kuitaat ar gwez da glask boued. Setu ma teuent tost d'an tier ha d'ar jardrinoù. Gwelet e vezent o treuziñ al linennadoù funioù tredan, an eil war-lerc'h egile, ar pared da gentañ, ar mammoù da heul, unan bihan stag ouzh o c'hostez, oc'h ober ar c'hempouez gant o lost hir bodennek.

Loeiza a reas kamaladez gant div pe deir skoliadez eus he c'hlas. Ne veze ket hec'h-unan ken e-pad an diduadennoù pe er sal-debriñ. Pa zegouezhas fin miz Gwengolo e oa bet laouen o vezañ pedet gant Morgane da zont ganti da foar Vikael. Bet e oa bet ur wech gant he zud, pemp pe c'hwec'h vloaz kentoc'h, ha ne oa chomet enni met an eñvor eus ur mor a dud, hi e-kreiz, sachet

gant dorn nerzhus he mamm, hag ur vargodenn a blijas kalz dezhi. Prenet e oa bet dezhi gant he zad, ha dibaoe eo chomet c'hoazh an struskañval bras-se, e grognon roz, a-istribilh ouzh solier he c'hambr e Penn-Ti-Ruz.

Chom a reas un tamm war he c'hoant dirak disoc'h dister ar goulennoù bet graet gant c'hoar Nakchami. Mezh he doa un tamm zoken anzav d'an enseller ne oant ket gwell ha se. 'Vel lâret, e oa deuet da welout anezhi, tres kontant warnañ.

– Sur omp bremañ e oa klañv-bras an itron Arzel. Prantad diwezhañ ar c'hrign-bev en he skevent, evit bezañ resis.

– Tres mat a oa warni, ar wech diwezhañ am boa gwelet anezhi.

– Ne roe ket da c'houzout, d'am soñj. E kement ha ma oa medisin, ne oa ket diaes dezhi kuzhat an traoù. Evezhiañ a rae ar c'hleñved oc'h ober e hent enni. Cheñchet he doa doare he gwiskamant, desket he doa livañ he dremm, met kement-se ne oa 'met tremen lost al leue dre genoù an dud.

– Ha penaos ho peus gouezet se holl ? Suzon eo he deus lâret deoc'h ?

– Suzon ? N'eo ket! Kavout a ra din e oa bet touellet hi ivez. Pa oa distroet an doktorez eus Mayotte, he doa lakaet he mignonez ar c'hemm war gont ar bloavezhioù er broioù tomm. Ha dre ma oant chomet pevar pe bemp bloaz hep en em welout...

- Piv en deus lâret deoc’h neuze ?
- Dislonket en deus hec’h urzhiataer un toullad sekredoù. Skrivañ a rae un deizlevr hi ivez, ha lennet ‘m eus anezhañ. Gouzout a ran, n’eo ket dereat lenn pajennadoù prevez, met ar pezh ho peus graet, da vignonez ha te, ne oa ket gwelloc’h. O kenderc’hel gant an enklask emañ !

Santout a reas Loeiza e oa o ruziañ abalamour d’ar rebech.

- Ur werennad chug-orañjez ho po ? a c’houlennas kement ha cheñch ar gaoz.
- Gant plijadur !

Keit ha ma oant o tarlipat o banne, ar saloñs o teñvalaat gant ar pardaez, e kontas fin an istor dezhi.

- Ouzhpenn he deizlevr ‘m eus kavet, a gen-dalc’has. Un doser a oa ivez gant an holl teulioù bet dastumet ganti e-sell da advabañ Fouad ha Mounissa.

- Moaien ‘zo d’ober se, advabañ an dud deuet ?

– Hag a zo. Aotreet eo gant al lezenn, bernioù traoù a vez d’ober memestra. Pa oa bet disklêriet he c’hleñved, d’am soñj, ne oa ‘met ur mennozh en he fenn : chom bev. Hep gouzañv muioc’h. Ar peurrest zo bet pellaet diouti ‘pad ur pennad.

- Met perak e skrive Fouad dezhi ? Perak e oa bet dre guzh en ti ?



– D’am soñj e espere he defe roet arc’hant dezho. Lâret he doa he defe graet war o zro. P’en doa gwelet ne rae van ebet e oa bet hegaset. Santimant en doa e oa bet troet ar bajenn ganti. O c’houzout ouzhpenn e oa e c’hoar yaouankañ e riskl da vezañ argaset e oa bet dekkementet e gounnar. Setu perak e oa aet da glask war he lerc’h evit lakaat anezhi da zerc’hel d’he fromesaoù. Pa oa bet roet da c’houzout dezhañ e oa marv ar vedisinez, en doa klasket gwiriañ, gant ar pal kavout un teul pe un tamm arc’hant.

## D’ar 25 a viz Gwengolo

War-lerc’h, penn kentañ ar sizhun evel boaz, gant kentelioù, goulennoù dre skrid, ha tout ‘pezh a ra buhez ar skolajidi o deus un urzhiataer hag ur post-tele, Loeiza a evezhie a-bell ouzh Monday o taoulammat el liorzh klozet a-ratozh evit ar chas. Azezet war ur bank e saoure douter an heol a strinke tarchoù sklêrijenn er glaster hag er bodennoù. Monday a c’haloupe, a bigne war ar pleñch a-stou en hentad sportel, a rae beskelloù en dachenn pa ne chome ket a-sav da c’hvesa ouzh ur bouchad geot roudoù ar chas all tremenet kentoc’h. Ur wech dre vare, e veze etre ki ha mestrez ur sell a garantez, ha diouzhtu e tistroe pep hini d’e gefridi. Loeiza a oa o lenn levrenn gentañ ur saga faltazi bet prestet dezhi gant ur vignonez, istor karantez dreistordinal etre

ur plac'h anvet Bella hag ur suner-gwad. Ne reas van ebet pa zeuas unan bennak da azezañ e penn all ar bank. Al liorzhoù boutin zo d'an holl, n'int ket 'ta? Ha degouezhout a ra bewech pa vez brav un tammig. N'eus netra welloc'h da doullañ kaoz eget pourmen ar chas war an tachennoù boutin. Alies, dre forzh mont gant ar memes hent, e teu an dud da vagañ gwir zivizoù. A-boan ma savas he daoulagad pa lâras dezhi an hini nevez deuet :

– Koant eo da gi ! Peseurt anv eo ?

– Monday !

« Sell 'ta, fentus eo, ha pelec'h emañ e gi dezhañ ? » a c'houlennas Loeiza outi hec'h-unan, kustum ma oa da welout chas da heul o mistri. Pe ar c'hontrol.

– Ha karout a rez anezhañ, me 'soñj. Alies e welan ac'hanout o pourmen er c'harter.

Loeiza a savas he fenn. E penn all ar bank e oa ur paotr yaouank ordinal : e wiskamant a oa heñvel ouzh hini al liseidi a wele bemdez, botoù-basket, jeans ha justin gant ur gapuchenn, betek e gasketenn troet war-dreñv. Ur spilhenn war gwareg e abrant a skede war e groc'hen rous. Kompren a reas a-daol trumm e oant en o-unan-penn el liorz, 'pezh na blijas ket dezhi. Tremen sklaer e oa, ne oa ket deuet dre zegouezh.



D'an eur-mañ goude lein, ki-spagn ostaleri ar blasenn ne oa ket er-maez, na ki gwenn an ti melen kennebeut. Hec'h-unan e oa. Hec'h-unan gant an den dianav-se, ha Monday oc'h ober e droioù dibreder hep ober van.

– Ne blijfe ket dit e tegouezhfe tra pe dra gant al loen kalonek-mañ ? a c'houlennas ar paotr.

Stardañ a reas Loeiza he levr ouzh he bruched. Ar golo du gant un aval ruz a lugerne en heol, met e daoulagad ar paotr yaouank n'eo ket madelezh a skede d'ar poent-se. Tostaat a reas un tammig outi.

– Gouzout a ran e oas bet en ti bras. Gant ur vaouez tev, blev gris dezhi.

Loeiza ne lâras grik, sebezet ma oa. Ma Doue 'ta, a soñjas, gwelet e oamp bet.

– Ne dalv ket boan lâret n'eo ket gwir, a gendalc'has ar paotr dianav, evezhiet 'm boa ac'hanoc'h.

– Met, ne oa den ebet er ru ! » a nac'has ar plac'h yaouank.

– Er ru, nann ! Met en otoioù ?

Trec'het e oa Loeiza. Santout a reas an daeloù o sevel d'he daoulagad. An trubuilhoù a oa o vont da gregiñ. Biskoazh n'he dije dleet selaou Suzon, na lezel ar c'hoant gouzout da vougañ ar skiant-vat. Gant unan e oant bet gwelet ha tamallet e vefent da laerezh.

– Selaou, a lâras ar paotr yaouank, o verzhout pegen trubuilhet e oa ar grennardez, n'emaon ket o klask ober droug dit, e gwirionez.

– Ha petra a fell deoc'h neuze ?

– Un dra bennak a oa e ti ar vedisinez kozh hag a zo din.

– Perak ne c'houlennit ket digant Suzon, ganti eo emañ an alc'hwezioù bremañ.

- Gant piv ?
- An Itron Le Coz, a zo perc'hennez bremañ.
- An hini dev en em wee war-lein ar porrastell ? Honnezh an hini eo ?

Dirollañ a reas da c'hoarzhin.

- Un diot a rez ac'hanon, pe betra ? Perak e vefe aet e-barzh e-giz-se, en arvar da bikañ he feskennoù pe da derriñ he gar, ma 'z eo libr da vont e-barzh pa gar ? Arabat ober goap ouzhin, sirius on me !
- Met ar wirionez eo, a grias Loeiza, imoret. Ne oa ket tremenet c'hoazh dirak an noter, en doare ofisiel. Ha pres 'oa warni.
- Pres evit petra ? Skarzhañ traoù dre guzh eus an ti a-raok na zeufe ar boliserien da bourmen beg o fri ? Gwelout a rez, pa lâran dit ez eus bet tapet un dra bennak din-me, o paouez anzav emaut da-unan.
- Forzh petra !

Sevel a reas Loeiza, reut gant ar gounnar. Ne felle ket dezhi klevout hiroc'h.

- Tapet hor boa an urzhiataer, traken. Sed aze 'pezh a fell deoc'h tapout en-dro, un urzhiataer Toshiba ?

Pouezañ a reas war he brec'h, oc'h ober dezhi azezañ. Monday ne rae van ebet ouzh o c'homzoù prim. « Nag ur c'hi-gward », a soñjas Loeiza o welout anezhañ oc'h ebatal.

– Trankil, plac’h yaouank. Hoc’h istorioù urzhia-  
taer, n’em eus netra d’ober ganto. ‘Pezh a fell din eo  
adtapout ma zraoù, neuze e ranki lâret d’an hini  
gozh : pe resteurel ma zraoù din, pe dont amañ  
gant an alc’hwez ha me ‘yelo ganti, da furchal en  
ti-se. Betek dimerc’her ho peus, a-hend-all...

– A-hend-all ?

– Ez in da lâret ur ger da honnezh, da vignonez.  
Mersi evit bezañ roet hec’h anv din.

Sevel a reas ha kerzhout a gammedoù hir war-zu  
penn nec’h al liorz. Spontet, muioc’h evit na felle  
dezhi diskouez, e stagas Loeiza ar c’hi, hag ez eas  
kuit, hi ivez. He jiletenn c’hloan c’hlas ne zalc’he  
ket tomm a-walc’h dezhi ken. Kridienniñ a reas,  
hep gouzout petra ober. Touet he defe ne oa bet  
tapet nemet an urzhiataer gant Suzon, ar Sulvezh  
se. Met ne oa ket chomet peg outi penn-da-benn  
ar weladenn. Ha ma lârfé gwir ar paotr yaouank ?  
Pe c’hoazh, ma vefe deuet Suzon en-dro, dre guzh  
evel ar wech kentañ ?

Trabaset e oa ivez an enseller Henaff. Ne blije  
ket dezhañ e chomfe direspont ar c’hevrin, ha diegi  
en doa da glozañ an doser. Goulennet en doa gant  
Suzon dont da gavout anezhañ war terasenn an  
ostaleri Tro ar Bed, e porzh bageal ar Vilin Wenn.

–Komzit din diwar he fenn, a c’houlennas. Penaos  
e abuze hec’h amzer abaoe ma oa war he leve ?

O prederiañ e oa Suzon e-ser sellout ouzh kouc'hoù gwenn ar bigi dre lien a vrañselle sioul 'tal ar pontonoù. O soñjal en he mignonez beuzet en ul lec'h damheñvel ?

– Ac'hanta, beajiñ a rae aliezik.

– Hec'h-unan ?

– N'ouzon ket, evit ma c'helo ne vezen ket dalc'hmat ganti.

– Perak ? Ne oac'h ket he mignonez ?

– N'on paouezet da labourat nemet ar bloaz paseet, me, ha ma leve gwerzhourez n'eo netra e-keñver hini ur medisin.

– Met gouzout a raec'h da belec'h ez ae ?

– Pas dalc'hmat ! Resevet 'm eus bet kartennoù-post eus Aostralia, Thailand ha Perou, pe profoù bihan eus he beajoù. Met gwechoù zo ez ae diwar wel hep reiñ sin ebet.

– N'omp ket kalz avansetoc'h, a huanadas. Ha pa ne veze ket er gêr, petra a rae ? Ne empennan ket anezhi o poaniañ er jardin.

– Plijout a rae dezhi lenn, bale, skrivañ ivez 'gav din. Chomet e oa tost ouzh ar vicher, en ur mod. Bizitourez a-youl vat e oa en ospital Ponchelet, tost-tre d'he zi.

– Ha petra a rae eno ?

– Ober kompagnunezh d'ar re glañv, moarvat. Ne gomzemp ket kalz eus se, rak me, ar re gozh, an ospitalioù, n'on ket dedennet ganto. Grit un dro eno, un deiz bennak, m'ho peus amzer gant an enklask.

Interesant e kavas an enseller alioù a seurt-se. Ul lonkadenn gafe, hag eñ ha respont :

– Spontet eo Loeiza, c’hwi oar ! Telefonet he doa din, dec’h da noz. Moarvat he deus galvet ac’hanoc’h ivez.

– Ya, evel-just ! Lâret ‘he deus din e oa bet gour-drouzet, unan bennak a vefe o tamall ac’hanon da laerezh hag a fellfe dezhañ adaptout n’ouzon dare petra. Follentez penn-da-benn !

– Ha perak e vefe ar paotr yaouank-se o soñjal kement-se ?

– Ha me oar, me ? C’hwi an hini a zo poliser !

– Gwelet en defe ac’hanoc’h ho-tiv o tont ‘maez an ti, hervezañ. Ha ganeoc’h eo bet desachet ar baotrezig-se er jeu.

Mezhus e oa Suzon , soublañ a reas he daoulagad. Meskañ a reas he banne te hag a oa o yenaat, ha krial :

– Ma oa ar paotr-se o spiañ an ti eo abalamour ma oa e vennozh mont e-barzh, eñ ivez, hag hep aotre, peogwir ne oa ket Helen aze ken da zigeriñ an nor dezhañ.

– Kement-se ne ra ket un drouklazher anezhañ. Marteze zoken ne ouie ket e oa marv an doktorez Arzel. Kalz tud zo ha na lennont ket ar c’hazetennoù.

Ma ‘z eer e-barzh dre ar porrastell bihan dirak ar skol-vamm, e seblant an ospital Ponchelet



bezañ, d'ar c'hentañ gwel, ul lec'h degemerus ha sioul. Ul liorz h vras, gwez tro-dro dezhi, o vont eus ur ru d'eben, klozet a-dreñv mogerioù mein uhel. Bankoù du-mañ du-se o kinnig d' an dud diskuizhañ, amzer dezho bamiñ gant ar skeudoù taolet gant an heol war an horolaj-heol, hir e levn evel ur falc'h, pe selaou kloc'h ar chapel he zoenn mein-to o tishiliañ an eurioù.

Gant ar renerez e oa bet degemeret al letanant Henaff hag e eiler Cervione. « Eus ar c'havell e vezont dibabet bremañ », a soñjas an enseller o welout dirazo ur vaouez yaouank tregont vloaz a-boan, gwisket brav gant ur sae skañv. An emgav a oa bet lakaet diouzhtu d'an eur ma tigore burevioù an ospital, ne felle ket dezhañ lezel an titouroù bet an derc'hent digant Suzon da glouaraat.

– Mont en un ti retred zo gwashoc'h eget ober tro an holl vageerien er marina a lâras Cervione.

– War marv an doktorez Arzel emamp oc'h enklask, a lâras an enseller goude bezañ saludet 'vel zo dleet.

– Kelaouet on bet, a respontas ar vaouez yaouank. Trist eo bet an holl ac'hanomp gant kement-se. Penaos e c'hallan sikour ac'hanoc'h ?

– Dre zisplegañ deomp dre ar munud petra 'rae Helen Arzel en ho ti-retred.

– N'eus netra kuzh. Moarvat e plije dezhi tremen eurvezhioù en ur bed bet he hini bloavezhioù 'pad.

Kompagnunezh a rae da zarn eus an annezidi, lenn a rae d'ar re na gerzhent ket ken, komz a rae outo, ambroug a rae lod d'al liorzh. Traoù dister hag a zo a-bouez bras, c'hwi 'oar !

– Da bet annezad a rae bizitadennoù ?

– Da dri pe bevar, 'gav din. Pennadoù div eurvezh goude kreizteiz. Dont a rae ingal, ha reiñ a rae da c'houzout pa vefe ezvezant. Kroget he doa ur bloaz war-lerc'h bezañ war he leve, amzer dezhi kompren he deveze kalz amzer dibrez.

– Tremen a rae mat an traoù atav ?

– An holl a gare anezhi, n'eus ger all ebet. Tres imor vat a veze warni dalc'hmat, degas a rae lipou-zerezh, lakaat a rae ar re gozh da c'hoarzhin, da ganañ, broudañ a rae o memor gwan a-wechoù. Lakaet he doa ur sklêrijenn vev en o buhez, trist un tamm. An dud kozh-se n'o devez alies mann ebet ken da c'hortoz.

– Ha gant an implijidi, mont a rae mat pep tra ? Moaien 'vo deomp da gaozeal ganto ?

Sevel a reas ar renerez evit sellout ouzh an daolenn peget 'dreñv he burev. Skrivañ a reas anvioù war ur follenn.

– Setu, emezi, anvioù ar re a zo amañ fenoz. Div glañvdiourez, teir eilerez. Evit ar re all e vo ret deoc'h dont en-dro. Deuit, emañ o vont da ambroug ac'hanoc'h.

An daou boliser da heuliañ anezhi, eus trepas ar melestradurezh d'ur savadur all, hini an annezidi.

– Arabat strafuilhañ anezho, a lâras ar renerez en ur gas anezho d’ur sal vihan, enni kadorioù-brec’h, ur gourvezvank livioù lirzhin, hag ur geginig gant ur mekanik kafe.

– Er penn kentañ, ‘m boa bet kaz outi, a lâras Stéphanie, ur glañvdiourez vihan ha nerzhek. Pa ‘z aen d’ur gambr evit ober war-dro unan bennak, e kave bewech un dra bennak da lavarout. Pe al lienadurioù, pe ar mod d’ober ar pikadennoù a veze fall, pe re zifonn e oan pe re nebeut. Re an dra-mañ pe re an dra-se. A-benn ur pennad e-giz-se, ‘m boa divizet chom hep en em gavout ganti. Eilpennañ a raen ma zroiadoù er c’hambrou! Eskemmet ‘m eus a-wechoù ma zroiadoù gant ur glañvdiourez all. Gant Anaïs peurliesañ.

– Simploc’h evel-se, a lâras Cervione. Gwelloc’h eo evit an holl ! ‘Mod-se ne vez ket cheu !

Ar glañvdiourez yaouank a droc’has war e gaoz.

– Ne vez ket gwir atav, sur-mat ! M’ho pije gwelet an arvest a oa bet gant Alban an devezh all ! Klevet e vezent ouzh penn all an trepas !

An enseller a c’houlennas gouzout hiroc’h. Piv ‘oa an Alban-se ?

– Un eilklañvdiour eo, o labourat emañ amañ abaoe daou vloaz. Ur paotr yaouank plijus, istor ebet gantañ. Ar maouezed kozh a vez desachet gantañ. Cheñch a ra pa vez paotred e-touez skipailhoù merc’hed, dreist-holl paotred yaouank.

– Ha petra ‘oa degouezhet ?

– N’ouzon ket mat. Dalc’het ‘oan gant an Itron Hascoet, oc’h ober war-dro he divesker. Dre m’eo bouzar-kloc’h, e vez ret kaozeal kreñv. Yudal a ran en he divskouarn, hag hi a respont war memes ton. Setu ma oa bet dav dezho ober trouz da vat a-raok desachañ ma evezh. Lakaet ‘m boa al lienadur hag aet e oan da welout.

– Ha neuze ?

– N’em boa ket gwelet kalz a dra. An holl re a oa gouest da gerzhout a oa en trepas. Ne oan ket o vont da zilezel ma c’hlañvourez ; astennet ‘m boa beg ma skouarn a-raok ober hanter-dro. Kavout a ra din ‘m boa klevet Alban o krial « n’ho peus ket droed ! Laerezh eo ! », hag Helen he doa respontet un dra bennak ‘giz-mañ « c’hwil an hini eo an torfedour ». Erruet e oa ar renerez neuze. Aet e oan en-dro d’ar gambr. Setu ‘pezh a ouzon diwar-benn ar c’hrogad-se.

Gant Laura an eilklañvdiourez e oa ar memes doare keloù. Ne oa ket war al lec’h, ha n’anaveze an darvoud met dre selaou klakenniñ er sal diskuizh. Eviti ivez, an doktorez Arzel en em sile e aferioù ar re all, a rae tud divarrek anezho, dirak an annezidi zoken.

– Ur c’hozh kroc’hen, ma komprenan mat, a lâras Cervione. Ne vanko ket d’an holl.

Ur fulenn a skedas e daoulagad ar glañvdiourez, met ne fellas ket dezhi mont pelloc’h. Klokaat a rae

poltred Helen gant dremmoù disheñvel chomet diwel da Loeiza ha da Suzon. Ne oa ken 'met Sara, an eilklañvdiourez goshañ, evit bezañ hegarat e-keñver an hini varv. Un skeudenn disheñvel a roas anezhi, ur vaouez damantus, a gemere hec'h-unan plad merenn-vihan hini pe hini evit pozañ anezhañ war an daol, a lakae koavon-dousaat war an daouarn kozh, a zegase evito sonioù o amzer gozh. Goude bezañ bet tremenet, ne chome ket ken war dremm ar re gozh an aer damgollet a ra dezho bezañ ken fromus ha ken bresk.

– Peur e c'hallfen kejañ ouzh an Alban-se ? a c'houlennas Henaff gant ar rener. War a seblant e oa bet reuz etrezañ hag an doktorez Arzel. Perak n'ho peoa lâret netra deomp bremaik ?

– O, an dra-se ? Nebeut a dra. Un eskemm prim un tamm, setu tout ! Gourdrouzet em eus Alban, evitañ da ginnig digarezioù, netra vuioù'h.

– Ha gouzout a rit petra e oa bet kaoz d'an tabut-se ?

– 'Toare he doa kavet an doktorez abegoù er mod ma veze lakaet al lienennoù gant Alban. Respon-tet en doa dezhi e rae e labour evel dleet ha savet e oa an ton etrezo. Ur seurt chefez oa Helen !

– Ya, un dro-spered diaes, 'm eus aon ! Ne oa ket mignonez gant an holl moarvat. Setu an Alban-se, peur e vefe moaien da glevout anezhañ ?

– Ar sizhun a zeu e vo en-dro.

– Anv ebet da c'hortoz eizhtez. Ret eo din kaout e chomlec'h.

Ur glikadenn logodenn bennak, stirlink ar voulderez, hag e astennas ar renerez ur follenn dezhañ. Alban Roussel 14, ru Laenneg. « Chañs ho peus, tost-tre eus amañ emañ o chom. »

Pa oant o kuitaat an ospital e lâras an enseller Henaff d'e eiler :

– Gwelloc'h eo ganin chom hep soñjal penaos e rae Helen Arzel gant he c'hoskor er broioù tramor.

Marteze he doa kaset unan bennak d'ar par pellañ, a gendalc'has Cervione. Pa oan mous, ma mamm a laboure evit ur vaouez evel-se. Ur plac'h yaouank kozh, renerez ul lise merc'hed, a veve en un ti bras gwenn. A-drugarez dezhi hor boa bet an telefon. Diwezhatoc'h 'm boa komprenet e oa un eskemm : lakaet he doa Mammig da vatezh. Ret e veze d'am faourkaezh mamm redek diouzh-tu pa veze galvet. Kaz am boa ouzh doareoù rust ar vadam-se, he mouezh skiltr, he zon aotrouniek. Ne oamp ket bet niverus da zeiz hec'h obidoù, a c'hallez krediñ !

\*

– Ma n'ho peus tapet netra, Suzon, neuze, emañ c'hoazh en ti ar pezh emaomp o klask. Deuit ganeomp !

Buan e teuas an heritourez roz he dremm gant ar blijadur. Un hanter dousennad poliserien

a oa tro-dro dezhi. Ar polis o c'houlenn sikour diganti ! Gwisket he doa evit an degouezh ur gorfenn gloanaj gwer hag ur jean strizh. Simploc'h marteze evit he dilhad boas. An enseller Henaff a gloze an dibunadeg e liorzh an ti bras. Serret bepred ar stalafioù war gevrin marv Helen.

– Arabat mont pep hini eus e du. Chom a raimp holl er memes pezh, a vo furchet traoñ-ha-laez.

A-benn div eurvezh labour e krogas an digalon enno. Furchet o doa an div gambr, al levraoueg hag ar burev, hep ankounac'haat ar sal-gibellañ. En aner. Kement tra a veze cheñchet plas dezhañ a veze adlakaet. Suzon a daole evezh. Doujañ, hervezi, da goun he mignonez. Er saloñs, albo-moù-fotoioù, levrioù, ur c'hoari stroll bennak, netra a dalvoudegezh.

– Ha kaoc'h ! a grias ar poliser. Ne vo ket freuzet ar plañchod memestra.

Er gegin e oa digoret dija ar yenez hag ar presoù gant poliserien.

– Ec'h! a huchas Suzon. Nag ur flaer, taolit se !

– Anat eo, n'eo ket war-lerc'h un tamm fourmaj-kig brein emaomp o klask, a lâras ur poliser en ur ziskouez ur plad warnañ un dra brun c'hwez fall ha goloet a vlev.

Hini ha hini, kement tra a oa renket er gegin en em gavas war an daol, pouezataet, sonteet, hejet.

Koñfitur, mel, chokolad poultr, te, kafe, holen, sukr, bleud, pep tra a veze ensellet pizh. Gant troad ur fourchetezenn e veze mesket pep podad, tañvaet pep danvez, kuit da strevial pe da weañ ar fri. Adlakaet o doa ar boliserien an traoù er presoù, sentus.

– Kendalc’homp, a huanadas Henaff, pa zegouezhas an tamm diwezhañ war an daol. « Kub Maji, Un diñs leun a ijin ! » a oa skrivet war ar paper ruz ha melen. E-barzh, sekred ar meuzioù lipous, an tammoù diñsoù toaz brun brudet abaoe 1908 evit reiñ ur blaz dispar d’ar c’heusterennoù. Ha piv en em lakaio da zispakañ ar baperenn ha da dañva? Den ebet n’en doa c’hoant hag al letanant an hini a gemeras an diñs hag a rufas anezhañ.

– Blaz yer ? Legumaj ? Bevin ? Ac’hanta, Aotrou, lârit deomp ‘ta, a lâras ur goapaer.

– N’emaoc’h ket ganti ! a estlammas Henaff. Hachich eo.

– Se an hini ‘oa, a gadarnas pemp munut war-lerc’h, en ur gouezhañ war ur gador-vrec’h a skrijas dindan e bouez. Div voestad 100 gramm, pourvezioù kaer evit ar goañv. Eizh euro ar gramm, kompren a ran perak e rae kement a vec’h an eilklañvdiour evit adapout e varc’hadourezh !

Suzon a chomas he c’henoù digor war nav eur gant ar sebez. Hachich ! Biskoazh n’he doa bet tro da welet seurt tra, ha padal e oa anezhañ koachet e ti he mignonez a-viskoazh !





– Aet omp, neuze ? a valbouzas-hi pa oa ar strollad poliserien o vont ‘maez ar gegin, gant o c’havadenn brizius.

– Ha petra c’hoazh ? a nac’has an enseller. N’eo ket bet furchet pep tra. Touet ‘m eus furchata an disterañ santimetr en ti-mañ, ha tremen gant un

hanter a fell deoc'h ! Nag ur skouer a goustiañs vicherel e vefe !

Ur sell du a daolas Suzon warnañ.

– Emaoc'h oc'h hegasiñ ac'hanon, Suzon ! Ar mintin-mañ e oamp bet e Ponchelet, bremañ emaomp amañ o klask 'vel chas-chase hag emao'h o lâret din dilezel ?

– Piv he doa aliet ac'hanoc'h da vont da ospital Ponchelet ? a eilgeras-hi, fuloret. Piv estregedon ? Piv zo o hejañ ac'hanoc'h abaoe ur miz evit prouiñ eo bet taolet ma mignonez en dour ? Gortoz a rin ac'hanoc'h er jardin.

Fellet oa bet dezhi memestra e vefe digoret ar stalafioù, hag ar maner ne seblante ket ken trist, alaouret gant heol dous ar pardaez a daole sklêrijenn en-dro d'an arrebeuri hag a roe da grediñ e oa un tamm buhez c'hoazh ennañ. Suzon a savas ivez pouezioù an horolaj chomet a-sav hag a gasas d'ar jardin div blantenn c'hlas o delioù melenet a-istribilh 'vel brec'hioù sec'h.

– Klask a rin saveteiñ anezho, a lâras dezhi hec'h-unan. Kement-se da vihanañ on gouest d'ober.

Ur gannerez, ur sec'herez-kouez, ur sec'hadeg, pakadoù lisiv, ur bidon soavon da zousaat an dilhad, c'hwez lavand gantañ. Dre ur prenestr bihan 'oa goulouet al lochenn, hag ur sklêrijenn damc'hlas a dremenas dre douez delioù ar wezenn-lore plantet

en tu all d'ar voger. Un daol-feriñ a oa a-hed ar voger, ur gevridenn he doa stennet he gwiad etre he zreid. Un tamm lisiv pe soavon war beg ar biz : evel er gegin, pep tra tañvaet. Ha bingo ! Poultr lisiv n'eo ket, sur ! Kokain kentoc'h. Setu ar pezh a glaske Alban, a zisklêrias Henaff.

– Gwall vuan ez it ganti, a lâras Suzon, pa oa ar skipailh o pellaat da vat eus an ti. Piv a lâr deoc'h eo an drogaj d'ar paotr-se ?

Gant peseurt ger he defe graet, hi ha n'he doa bet gwelet biskoazh seurt tra 'met er filmoù ? Biskoazh ne oa bet Suzon tomm ouzh an traoù-se (he fec'hedigoù a oa kentoc'h war-du ar sukr pe ar chokolad). Hach ? Kanab ? Hini wenn ? Mousc'hoarzhin a reas an enseller outi, neuz gwidreüs warnañ.

– O vont da wiriañ emañ, Itron ger. Da gentañ e vo goulennataet war e dabut gant Helen. Perak e oa bet sach-blev etrezo ? Goude-se e vo tro Loeiza da sellout outañ. Ma anavez anezhañ e vo sklaer emañ gant an hent mat. Ur vartezeadenn all ho peus, marteze ha na vefe ket ken meuleudius evit eñvor an doktorez Arzel ?

\*

– Un deiz, en doa ur c'hamalad kinniget un itrik din evit pakañ arc'hant, a anzavas Alban.

Stouiñ a reas e benn. « C'hoant am boa da gaout arc'hant a-walc'h nemetken evit profañ ur veaj d'am mignonez. Pell 'zo emañ oc'h hunvreal mont da Amerika ar Su, met kaer em boa espern, biken ne zeufen a-benn. »

– Petra 'oa degouezhet ?

– Goulennet en doa diganin koachañ e varc'hadourezh gant ma hini. Gwerzhañ kokain, n'eo ket ma jeu din, me a rae war-dro ur stalig kanab, aesoc'h da werzhañ. Da bep hini e draoù, trankil e oa an afer. Reiñ a rae din un tamm moneiz evit lojañ e varc'hadourezh.

– Ha pelec'h e veze ganit ? Un tamm mennozh zo ganin, 'vel-just : en ospital, neketa ? Kuzhet 'poa ho marc'hadourezh e tunel Pontchelet, neketa ?

Ne oa ket Henaff hep gouzout e oa bet kleuziet e 1943 an tunel-se a gas eus an ospital Ponchelet betek ru gozh ar Gaz, war ar porzh. E-pad ar brezel e oa bet goudoret miliadoù a Vrestiz ennañ.

– Amprestet 'm boa alc'hwez ar gwasked, a respontas ar paotr yaouank. Unan zo gant ar renerez en he burev, met ne servij biskoazh, nemet ur wech bep daou pe dri bloaz marteze, evit koun lidoù pe devezhioù ar glad. Er penn kentañ e felle din nemetken bezañ sur e vije moaien da dreuzañ penn-da-benn betek an nor am boa kavet e tornaod ar porzh kenwerzh.

– Ha goude-se ?

– Er penn kentañ, netra ! Graet ‘m boa un eilad eus an alc’hwez, ha pourmen a raen dindan zouar, plijet bras e vezen ! Biskoazh n’ou deuet a-benn da dreuziñ tout, dorioù prenet a oa. Ha ne oan ket evit mirout an dram-se du-mañ ! O vevañ emañ gant ma mamm ha ma c’hoar vihan. Anv ebet e kouezhfent warni ! Kavet ‘m boa e vefe kav an ospital ur guzhiadell dereat. Ne oa ket ret zoken diskenn 119 pazenn an diri, peogwir e oa toulloù a-walc’h er mogerioù evit ‘pezh am boa da guzhat.

– Ur skoilh zo bet, moarvat ?

– E gwirionez, n’em boa merzhet netra da gentañ. Un eilad eus an alc’hwez ‘m boa graet ivez evit ma c’hamalad, dezhañ d’ober e jeu gant e varc’hadourezh. En un ospital gant ar mone-done, forzh piv a c’hell mont hep bezañ goulennataet. En noz zoken, dor vihan al liorz a chom digor, ha tud ar c’harter a vez o tont da vevañ kizhier war al letonenn.

– Dalc’h ganti ! Evit poent, ‘pezh a lârez ne gas ac’hanomp da neblec’h.

– Mat, daou viz bennak zo, ‘m boa bet ur bellgomzadenn digant ar paotr, imoret-spontus !

– N’emaout ket o vont da gontañ din e vanke poultr dezhañ ?

Krabisañ a reas ar paotr yaouank lein e benn.

– Geo, just a-walc’h ! Touet ‘m boa dezhañ ne oa ket me ! Perak ‘m-bije graet se, n’ouzon ket zoken da biv ‘vez gwerzhet ur machin seurt-se. Me ‘m eus

ur rouedadig Plasenn ar Frankiz, Yaouvezhioù ar studierien, gouel Astropolis, nozvezhioù ar porzh, hag un toullad liseoù ouzhpenn. Ne fell ket din c'hoari war un dachenn all.

– Kredet en doa ac'hanout ?

– 'Gav din ! Evitañ e oan kiriek memestra. Din e oa da gavout al laer hag an danvez. Sur ne oa ket o farsal, rak un tamm brav a voneiz eo memestra, 60 euro ar gramm.

– Un tamm mat a vanke ?

– Ur sac'had, 'gav din. Pevar-ugent pe kant gramm. Hag em lod ivez e vanke. Un tamm a-vent gant un dabletezenn chokolad.

– Met penaos he doa lakaet an doktorez he dorn warn an teñzor-se ?

\*

En he saloñs bihan e oa Suzon o ouelañ ; ur mor a zaeloù a rede war he divjod hep na rafe jestr ebet da stankañ warno. Distrujet e oa.

Abalamour da zrouklazh Helen pe d'an drog kavet e ti honnezh? « Petra eo deuet ma buhez da vezañ? » a soñje-hi.

Deuet oa a-benn an drammm daonet-se da frailhañ he fiziañs en he mignonez a-viskoazh. Ur mor a fromoù en em ganne enni, o lakaat an daeloù da ruilhañ. Kounnar, poan, digompren, ha dreist-holl ar santimant da vezañ bet traiset. Krenañ a rae he

daouarn en ur sevel he zasad, skuilhañ a reas ur banne te war an daolig koaret.

\*

« Soñj 'ta, a skrivas Loeiza da Nakchami, goulennet zo ganin mont da anavezout un den. Evel-just eo bet ret din kaout aotre ma zud. Soñj un tammig e penn ma zad p'en doa klevet tout an istor-se ! Biskoazh n'em boa gwelet anezhañ ken fuloret. Bet e oa ganin er c'homiserdi. 'Vel er filmoù polis e oa : diskouezet meur a zen, pep hini gant un niverenn, ha ret din lâret pehini a anavezan. "Ha sur oc'h ne raio droug ebet din ?" 'm boa goulennet digant al letanant. "Arabat bezañ nec'het ! Ne oar ket emhout o sellout outañ."

Neuze, 'm boa sellet pizh, hag aes a-walc'h e oa bet din anavezout ar paotr abalamour d'ar spilhenn en e abrant ha d'e zaoulagad gris. Diaes e oan un tamm, rak ne oa ket un aer drouk warnañ. Lâret e vefe bet zoken en doa aon. Met gourdrouzet en doa bet ac'hannon, memestra, ha Suzon ivez.

A-hend-all, Tadig ne fell ket dezhañ ken e vefen ma-unan o pourmen. Na gant Monday zoken. Soñjal a ra en em gavan gant tud fall. Daoust hag-eñ e oa o komz eus Helen, Suzon pe Alban? Ret e vez din mont war-eeun d'ar skolaj. Hir e kavan ma amzer. An enklask-se a oa mat din evit abuziñ ma amzer, met bremañ, n'eus mui netra dedennus e Brest. Krog eo da vezañ yen ha c'hoant da zistreiñ am eus... »

\*

– Domaj eo, he doa lâret an doktoez Arzel d’ar renerez, mizioù ‘oa, en ur resteurel an alc’hwez dezhi.

Ya ! Pegen mantrus eo e vefe al lec’hioù-se o kouezhañ en o foull. Fromus eo soñjal ez eus c’hoazh, ugent metr dindan zouar salioù oberata chomet ‘vel er bloavezh tri ha daou-ugent, pezhioù kempennet evit degemer tud klañv, gloazet pe repuet ? Bugale a oa bet ganet eno, zoken.

– O ! Me ‘vat, n’ou ket desachet gant ar mein kozh, he doa respontet ar renerez. Leun a boultrenn hag a wiadoù-kevnid int.

– Ma mantrus eo memestra, he doa kendalc’het Helen. Ret e vefe digeriñ al lec’hioù koun-se da Vrestiz.

E fin miz Eost e oa bet galvet Alban gant Henry (lesanvet Rico. Fougeüsoc’h eo an anv-se, memestra, daoust ma ne oa ket e Sikilia met e karter Ponta’ e Brest ‘oa bet ganet). Fuloret e oa. Chomet e oa Alban hep kompren. Ha klask a rafe Rico lakaat un dra bennak dezhañ war e choug ? Piv nemeto a c’helle mont d’ar c’hav ? Ar c’hast a furcherez-se, an doktoez Arzel, ne c’halle bezañ den estregeti.

Setu ar pezh a gontas er c’homiserdi.



Goude anzav Alban ez eas an enseller da vizitañ maouezed kozh Ponchelet. Moarvat ne oa ket kabac'h an holl re a dremene Helen hec'h endervezhioù ganto. Unan bennak a vefe gouest da reiñ un draig bennak da c'houzout dezhañ.

Marguerite Kervran, pemp bloaz ha pevar-ugent, ur Vigoudenn wiroc'h eget re ar bruderezh Tipiak, a oa azezet war ur bank. Deuet e oa eus ar Gelveneg da Vrest evit bezañ tostoc'h ouzh he merc'h hag a oa o chom e Brest. Dalc'het he doa ur pouez-mouezh kreñv a laouenaas an enseller. Dont a reas d'azezañ en he c'hichen. Div big a rede war ar geot.

– Div big, gwell-a se, 'veze lâret pa oan yaouank.

Mousc'hoarzhin a reas ar vaouez kozh, trist.

– Helen a vank kalz din, c'hwi 'oar. Hi an hini a veze azezet en ho plas war ar bank-mañ. Ken jentil a oa ! Hag he c'houignoù chokolad, mankout a reont din, tost kement hag hi !

Skediñ a reas he daoulagad. Un daeraouenn a redas. Un eñvorenn eürus ?

– Degas a rae kalz anezho ?

– Abaoe un nebeud mizioù. A-raok e oa bet maldenoù blaz bleuñv orañjez, mat-tre ivez.



Sellet a reas outañ. Tamm tristidigezh ken. D'an oad-se ne chomer ket da drueziñ re bell, gouzout a ra pep hini e ra an amzer he zro buanoc'h-buanañ.

– Domaj eo n'he defe ket roet he rekiye d'ar c'heginer, emezi. 'Pezh a vez roet deomp da verennvihan zo kaletoc'h eget betoñs. N'o deus truez

ebet ouzh hon dent kozh. Ha pegen stomokus ar gwastilli-se ! Re Helen da vihanañ a veze skañv, skañv ! Ha ni ivez en em sante skañvoc'h goude-se.

## D'ar 26 a viz Gwengolo

– Soñj 'ta ! Degas kouignoù-nij en ti-retred, memestra, ez ae pell ganti! An holl vammoù-kozh hon eus aterset o deus lâret ar memes tra. Bizitoù Helen a ziboanie anezho. Peseurt poanioù ? Chagrin an digenvez hag ar gozhni, poan ar melloù krignet gant an artroz, eurvezhioù enoeüs hirbadus ?

An daou enseller a oa o kaozeal, ur werennad bier dirazo. Trubuilhoù a bep seurt a oa bet 'pad an devezh, met bremañ e oant o saourin aergelc'h ar serr-noz e kegin rannidi Cervione. Aze ne oant direnket gant tra. Pervezh betek re, evel ur manac'h e veve ar C'horsad.

Mousc'hoarzhin a reas en ur soñjal en arvest a veze bet ur wech ar sizhun pe ziv goude kreisteiz e kambroù koant pe er jardin kaer an ti retred.

– Kanañ a raent, ha c'hoarzhin, barbilhat hag en em vezviñ gant kouignoù lipous Helen. Den ebet ne gave netra da lavaret, ne veze soñjet 'met er wellaenn degaset gant ur vaouez hegarat a vizite anezho. Met se ne ziskleir ket gant piv eo bet lazhet an itron Arzel !

– Nag Alban, na Fouad ne felle dezho anzav. Prouenn ebet, re nebeut evit lakaat hini pe hini da gablus. Ha kuzhet-mat e chom Rico.

– C’hwec’h mil euro ar c’hant gramm ! a grias Suzon. Pevar miz gopr evit ur sac’had poultr, ur c’haer a gresk d’ar bern evit an dibennoù-miz, a-walc’h eo evit lazhañ unan bennak, marteze. Anzavet en deus Alban muntr Helen ?

« N’en deus ket ! Teurel a ra ar bec’h war e geneil, hag hemañ en natur c’hoazh, evit poent. »

Tremenet e oa an enseller evel un tarzh avel. Tamm amzer ebet fenez da saouriñ gwastelloù lipous Suzon.

« Re a wastilli zo en istor-mañ » a soñjas.

Ne felle ket dezhañ lezel Suzon krignet gant an arvar hag an diskred. Dezhi da c’houzout perak he doa laeret Helen an hachich hag ar c’hokain, ha neuze da zerc’hel ganti skeudenn gaer o mignoniezh.

– N’on ket souezhet ganti, emezi, p’en doa kontet Henaff dezhi istor ar c’houignoù chokolad. Ne blije ket da Helen gwelout an dud anduriñ poan. Met ar c’hokain a oa evit petra ?

– Dizale e ouiimp, a respontas hep lavaret hiroc’h. Krefen direspont zo da sklaeraat c’hoazh. An dalc’h dindan evezh a vo echu hep dale evit Alban,

dre ziouer a brouennoù. Marteze e vo ret deomp lezel ar paotr da vont, ha klozañ an afer 'vel ur marv dre zardoud, dreist-holl ma ne c'hellomp ket lakaat hor c'hrabanou war Rico.

Lammañ a reas Suzon en ur bilat he c'hador war al leur-zi.

– Kement-se hon eus graet evit netra ? Pakañ daou werzher drog ? Kit 'maez a zu-mañ. O tuañ ar skeudenn 'm boa ouzh ar polis emac'h ! a huchas ar vaouez tev.

Seniñ a reas an telefon da eizh eur noz. « Evit ur wech m'am boa ur pennadig vak em familh » a c'hrozmolas an enseller en ur ziskourrañ.

– Alo ?

– Alo ? Amañ Pierre Mercier, tad Loeiza.

– A, ya, noz vat, Aotrou Mercier. Petra a c'hellin ober evidoc'h ?

O termal e oa Pierre, o klask e c'herioù.

– Goulennet 'm eus groñs digant Loeiza bezañ er gêr a-raok 7 eur noz, kuit da ruzañ er c'harter.

– Ar gwir zo ganeoc'h, a lâras Henaff. Yaouankik eo. Met perak telefoniñ din ? Degouezhet zo un dra bennak ? Loeiza he deus un dra nevez bennak da dreuzkas din ?

– Pa 'm eus gwelet ne oa ket erru em raok, 'm eus gortozet un tamm, a respontas Pierre. Un hante-

reur dale, c'hoazh, met hiroc'h... nec'het on. Galvet 'm eus a-zehoù a-gleiz, den ebet ne oar pelec'h emañ. Setu 'm eus soñjet e oa ganeoc'h marteze. Entanet eo gant an enklask-se war marv an dok-torez Arzel.

– Soñjet ho poa e c'hallje bezañ bet ganin ? Bis-koazh ne vez galvet ganin unan dindan oad hep kaout aotre e dud, anat deoc'h. Furoc'h deoc'h gervel ar c'homiserdi.

Un dek munutenn war-lerc'h e tegouezhas an enseller e ti Loeiza. Pierre a zegemeras anezhañ er gegin.

– Gwelloc'h e kavan mont buan, a lâras Henaff. Nec'het on un tamm. Traoù 'm eus da gompren.

– Digarezit, a respontas tad Loeiza en ur gregiñ da beliat ur batatezenn. Ma mignonez a vo er gêr a-benn un hantereur, ha n'eus netra prest evit koan. Gwelloc'h e kavan ober un dra bennak gant ma daouarn eget chom azezet da empennañ a bep seurt traoù.

– Kompren a ran, a lâras an enseller. Da bet eur 'oa fin an devezh-skol gant Loeiza fenez ?

Hep diskregiñ eus ar batatezenn e droas Pierre war-zu ar yenez .E-touez paperennoù digresk priz war ar pizza, rolloù defotachoù, ha traoùigoù all, e oa un implij-amzer skolaj.

– Meurzh zo. Echuiñ a ra ganti da 5 eur. Lakaomp

dek munut flaperezh hag ur c'hardeur war velo, da bemp eur hanter d'an diwezhañ e oa dezhi bezañ amañ.

– Un telefon godell he deus ?

– Da zaouzek vloaz ? N'he deus ket ! Gant he mamm hon eus divizet gortoz ken e vo Loeiza en teirvet klas.

Huanadiñ a reas.

– En un degouezh seurt-mañ, anat eo, 'vijemp bet kontant e vije unan ganti.

– Bezit dinec'h. Eus ti ur vignonez e c'halvo marteze, hag en em zidamallo evit an dale.

Ur mousc'hoarzh glas oa war dremm an tad. Gourlammat a reas pa glevas an telefon o treger-niñ.

– Petra 'm boa lâret deoc'h, a lâras ar poliser. Ho merc'h eo sur a-walc'h.

Met n'eo ket Loeiza a oa ouzh an telefon, ur poliser e-karg eus an enklask nemetken. O c'hervel al letanant Henaff. Pierre a astennas an telefon dezhañ.

– Kavet zo bet ur marc'h-houarn, Aotrou ! Ret eo gwelout hag-eñ eo hini ar plac'h yaouank.

– Petra zo ? a c'houlennas Pierre, nec'het o welout ar poliser o krizañ e dal. Kavet eo bet ?

– Hi, n'eo ket bet, met ur marc'h-houarn. Ret

eo deoc'h mont da welout evit bezañ sur eo hini Loeiza. Ganeoc'h ez an.

Dilezet e voe ar c'heginañ gant Pierre. Ur gerig a skrivas war un tamm paper evit Véronique, an nor a brennas, ha mont a reas da heul ar poliser o tiskenn etrezek traoñ ar ru.

A-geñver d'ar boubellenn evit ar gwer e oa daou boliser all o varvailhat trankil. Dont a rejont d'o c'haout.

– Amañ emañ, a lâras unan. N'eus bet touchet da netra.


A-dreñv poubellenn ar boutailhoù, kazimant diweladus eus ar ru, ur marc'h-houarn dilezet, e azezenn sanket e douar, ur rod war he flad. Mont a reas Pierre war-raok.

– Ne welan ket mat, emezañ. Ret e vefe sevel ar velo. Ar poliser a sachas buan war ar brankoù, a savas ar velo, hag a zegasas anezhañ betek penn uhelañ al liorzh.

– Hini Loeiza eo, sur ha serten, a lâras Pierre. Anavezout a ran ar pegsunioù war an difankeller : ur c'hangourou gwer bihan, hag ur glazard a v/Mayotte bet peget ouzhpenn ganti an hañv-mañ.

– Hep mar ez eus degouezhet un dra bennak ganti. A-boan daou c'hant metr a chome ganti d'ober, ha





pa vefe toullet he rod » a lâras an enseller en ur ziskouez ar rod dreñv. Moarvat eo bet skrapet. Ur c’harter zo ‘vel ur gêriadenn. Gwelet ‘vo bet un dra bennak gant unan bennak hag a lakaio ar bolise-rien war he roud. Ur gêr sioul eo Brest, c’hwï oar, netra heñvel ouzh bannlevioù dañjerus. Adkavet ‘vo Loeiza hep dale.

Tremen a rae an amzer. Leusket en doa ar paotr he sac'h-kein gant Loeiza, met re danav oa ar sklêrijenn bremañ evit lenn levrioù pe gaieroù. Evit divorzañ hec'h izili e krogas gant embregerezhioù dispar. O kontañ ar pazioù a-hed, a-dreuz hag a-viziezh. Ordin, kement se. Lakaat a reas ouzhpenn ar c'hoari troadig-kamm, ar bale da heul frailhoù al leur, ar bale dall... Pelec'h e oa ? Dalc'het e oa bet e koufr un oto, ne oa ket bet evit gwelout an hent kemeret. 'Pezh a ouie da vat eo ne oa ket padet ar veaj ouzhpenn pemp munut, hervez bizied treluc'hek he montr. War beseurt tu e oant aet ? War-zu ar porzh, leun a gorn-troioù, siloioù, sanailhoù, batisoù dizimplij ? War-zu ar gar ? Saliou ar seurt-mañ n'eus ket bernioù anezho, memes tra. Ar skol-vamm, deuet da vezañ atalier arz, a c'hallfe degouezhout. Saliou bras zo enni, arrebeuri ivez. Peotramant chapel sant-Paol, he zour betoñs euzhus taolet trema an neñv ? Skiant an em reterañ a oa kreñv enni, daoust me ne oa 'met daou viz e oa er c'harter. Soñj eus he mestr-skol hag a lâre dezho kaout daoulagad ur poltreder, rak n'eo nemet 'pezh 'vez gwelet mat hag a vez taolennet mat. Setu perak, evit skrivañ da Nakchami, he doa graet pourvezioù a skeudennoù bihan a-hed he zroiadoù. Met da betra e servije kement-se dezhi bremañ ? Pelec'h e oa, nondegast ! Ha perak ? Er romantou-polis a blije kalz dezhi e

teue an harozed a-benn da achap bewech, met hi a oa toullbac'het aze, tonket da vale hep fin ebet en ur sal duet gant an noz. Hejet e voe gant ur gridienn.

Rico, eus e du, a dride e galon ! Erfin e oa gantañ an tu da vezañ paeet. E c'hwec'h mil euro a vefe en e c'hodell a-benn nebeut. P'en doa gwelet an daou yaouank, azezet kichen-ha-kichen war bank al liorz, en doa kavet e vennozh. A-douez kant all e vefe gouest da anavezout ar grennardez-se hag a oa o toullañ kaoz gant Alban !

Dislivet e oa bremañ dremm tad Loeiza gant an enkrez. Goude bezañ anavezet marc'h-houarn e verc'h, ne fellas ket dezhañ distreiñ d'ar gêr.

– Ma merc'h zo un tu bennak, bac'het, skoet marteze, hag e vefe ret din chom da c'hortoz hep ober netra ? Nann 'vat ! Chom a ran ganeoc'h !

E holl nerzh a oa bet ret d'an enseller lakaat evit kendrec'hiñ anezhañ da chom er gêr, e ken kaz ma sonfe an telefon. Kelaouet gant ar pen-nad-skrid laosket en ti e oa Véronique o c'hortoz, debret gant an anken hi ivez.

\*

Ur pilad glav a gouezhas war garter Combani, pell eus Brest. Ar c'haniou a c'hwezas, o stlejañ dour ruz, a naetaas an diribin e-kreiz ar foukennoù

tol. Tamolodet e-barzh o zi, ar mammoù hag ar re vihan-tre a c'hortoze, keit ha ma oa ar re vras o skrijal gant levenez dindan ar strinkadennoù klouar. Dasseniñ a rae an toennoù gant un talabao bouzarus, delioù ledan ar gwez-mangez a zigore evel daouarn o tegemer un aluzen, e pep lec'h ne oa nemet joa ha c'hoarzhoù. Gant he c'hoarezed bihan ha bugale an tiez nesañ e tañse Nakchami un dañs-tro en ur ganañ a-bouez penn. O dilhad a bege ouzh o c'hroc'hen, hag ar re vihanañ, noazh-ran, a lamme plom en ur yudal gant ar blijadur. An treid diarc'hen a stlake en dour klouar, perlezennoù dour a stage ouzh plezhennoù ar merc'hed. Strinket 'veze dour an eil ouzh egile, splujet 'veze a-hed korf, o tiskenn an diribin 'vel 'vez c'hoariet gant ul luj, o treiñ, o tistreiñ, o strinkañ dour forzh pegement... Mare ar c'hlaveier a ziskoueze beg e fri, miz Here a dostae.

Ar plac'h yaouank a soñjas en he mignonez Loeiza, difennet outi mont er-maez en ur gêr diehan ha yen ar glav enni. Re a zañjer en doa lâret he zad. Nakchami a sellas tro-dro dezhi. Ha peseurt dañjer a c'hallfe gedal anezhi, hi, e-kreiz an holl dud-se anavezet mat ? Mignoned a vizer, peseurt droug o defe c'hoant d'ober an eil d'egile ?

He mamm a c'halvas anezhi. Echu e oa ar glav, an oabl a oa glas adarre.

– Deus d'ar gêr Nakchami ! An dilhad zo da astenn !

Da heul an deñvalijenn e vez alies ar yenijenn. Loeiza a serras he justin, skeudenn un euzhvil glas-mor treset warni , faos feur tro-dro d'ar gapuchenn. Dibleg oa chomet he mamm : arabat e oa prenañ dilhad goañv pa ne vefe warni nemet ticheurtoù ha brageier berr a-benn ur miz pe zaou.

Ar plac'h yaouank a glevas trouz ur paz a-us dezhi. Un alc'hwez er potailh, hag ur bann sklêrijenn o tallañ anezhi.

– Salud, eme ar biziter. Degas a ran boued dit.

Dic'houest e vefe bet Loeiza da lâret hag-eñ e oa an hini en doa skrapet anezhi. Forzh penaos en doa savet e skerb betek e zaoulagad ha gwisket e gabuchenn. War bouez e zorn e oa ur sac'h gwenn ha ruz, ur c'hwez fritez tomm o tont er-maez a rae avi dezhi. Poent koan a oa tremenet pell a oa, tost 'oa dezhi mervel gant an naon.

Astenn a reas ar paotr ar sac'h-se dezhi.

– Kemer ! Gwelloc'h debriñ keit ha m'eo tomm ! Forzh penaos 'm eus da gas ur bellgomzadenn, debr trankil, goude-se hor bo amzer da gaozeal. Lezel a ran ar gouloù ganit, amzer dit da echuiñ da bred.

Pellaat a reas, sevel tri derez, ha mont diwar wel. Chomet hec'h-unan, Loeiza ne chomas ket

da dortal. Dantañ a reas en ur cheeseburger doubl, fourmaj klouar o tiverañ outañ.

O klevout trouz ar paotr o tostaat en-dro ez eas buan d'azezañ, ha pa zigoras an nor, e oa o tarlipat he c'hoka. War ar gador en he c'hichen div voest goull a roe da c'houzout ne oa ket a-enep meuzioù lipous ar stalioù boued-prim.

Mont a reas daveti, kuzhet a-dreñv ar skerb a vouge e vouezh.

– O paouez telefoniñ du-se emañ. Da vreur zo bet digor-tre e spered !

– Ma breur ?

Darbet e oa bet da Loeiza mougañ gant ar souezhadenn. « Laosk anezhañ da gomz », a lâras dezhi hec'h-unan, abred eo evit lavarout ar wirionez dezhañ.

– Ba ya, da vreur Alban. Perak emañ, 'gav dit ?

– N'ouzon ket, me !

– O vont da lâret dit : en eskemm emañ. Kalz arc'hant e tle da vreur din, ha re bell amzer evit resteurel anezhañ din.

– A mat ! a lâras Loeiza gant ur c'hruz d'he divskoaz, evel unan ha na ra van ebet.

Hegaset e oa bet ar paotr yaouank gant ar jestr-se.

- Arabat dit c'hoari da blac'h faro. Ganin e chomi keit ha n'em bo ket adtapet ma arc'hant.
- Han, han. Ha petra 'lâr Alban ?
- Komprenet en deus ne oan ket o farsal, anat eo.

Sabatuet Alban? Abeg a oa ! Gant ar polis e oa dalc'het c'hoazh p'en doa sonet e defon pozet e-kreiz an daol. Ur jestr gant ar poliser, hag en doa ranket respont ha lakaat an uhelgomzer.

Mouezh rust Rico a dregernas er sal c'houlennata.

- Da c'hoar zo ganin, Alban ! Ret-mat eo dit restaol ar varc'hadourezh pe ma arc'hant. Amzer a-walc'h 'm eus laosket ganit, bremañ eo echu ar farsadenn !

\*

- Kendalc'homp, a c'houlennas an enseller. Lavaret ez peus da Rico ez poa disfiz diouzh an doktoez ?
- Ya, anzavas Alban. Lazhet en dije ac'hanon m'en dije soñjet e oan-me al laer. Sur on e oa an amerdourez-se !
- Ha pa oa marvet ar vedisinez, petra 'oa degouezhet ?
- Gwashoc'h ! Gourc'hemennet en doa Rico din da vont en ti ha da adapout e varc'hadourezh.
- Ha ne oas ket evit ober ?
- Divizet em boa ober. Dreist ar voger-dro e tlefe

bezañ aes, ne vez gwelet netra eus ar ru. Met pa 'm boa gwelet e oa ar polis oc'h evezhiañ an ti em boa komprenet ne c'halljen ket mont e-barzh. Ha ne oan ket sur e oa an traoù en ti c'hoazh, rak gwelet 'm boa an hini gozh hag ar baotrez. Ken buan all o doa kavet anezho ha galoupet kuit gantañ. Setu perak 'm boa hejet anezhi un tamm an deiz all.

– O klask ober aon dezhi ?

–Aon am boa evidon va-unan da gentañ. Ha bremañ emañ Rico o klask afer ouzh ma c'hoar. N'eo ken 'met dek vloaz !

War-nes gouelañ e oa. Mantret gant komzoù e gamalad ne oa ket Alban o paborn ken. Betek pelec'h e oa bet kaset gant an diotiz ? a soñjas.

– Telefon du-se, a alias an enseller. Da vihanañ evit disammañ da vamm. Ha, kement hag ober, e-lec'h klemmichal, soñj n'eo Loeiza met daouzek vloaz ivez.

Alban a reas an niverenn, sentus. Diouzhtu e voe diskroget er penn all.

Div baotrez skrapet, un dra bennak ne glot ket, a soñjas ar poliser. C'hoar Alban skrapet gant ur Rico fuloret-ruz, tu zo da gompren, met perak an diaoul en deus lakaet e grabanoù war Loeiza ivez?

– Alo !

– Alo ! Lea, te an hini eo ?

–Ba, ya, a respontas ur vouezh laouen. Piv 'fell dit e vefe ?



– Ha petra emañ oc’h ober aze ? a valbouzas ar paotr yaouank.

– Ha penaos ‘ta, petra emañ oc’h ober amañ ? O chom amañ ‘maon, kement ha reiñ da soñj dit. Gant Mammig ‘fell dit komz, Alban?

– Ket, ket, a lâras ar paotr. Lâr dezhi e vin diwezhat emberr. Na chomit ket da c’hortoz ac’hanon evit koan.

– Koan zo debret, forzh penaos, a eilgerias Lea war un ton goapaus. Manket ez peus an tartiflet.

Alban a skourras an telefon, gorrek. Gwelet ‘veze ar sebez war e zremm.

– Ne gomprenan netra. Lea zo er gêr ‘vel boaz.

– Ha me zo krog da gompren, a daolas an enseller. Daoust hag ar Rico-se en deus gwelet da c’hoar dija?

– N’en deus ket ! Biskoazh n’eo bet deuet du-mañ. Ur c’hamalad nozvezhioù, kwa ! Ha setu tout.

– Neuze, sklaer eo pep tra bremañ em spered : droukvesket en deus Loeiza ha Lea. Abaoe ar penn kentañ e oa oc’h evezhiañ ac’hanout, kement ha bezañ sur ne oas ket o c’hoari un dro lous dezhañ. Moarvat en deus bet gwelet ac’hanout el liorzhekêr, kichen-ha-kichen gant Loeiza, o pourmen ur c’hi. Evitañ e oa ar plac’h-se da c’hoar.

– Met Loeiza zo... a respontas Alban, a-raok bezañ troc’het sec’h.

– Ya ! Eus Azia eo Loeiza, teñval eo he c’hroc’hen, flour ha du he blev, met petra a vir ouzh Rico da

soñjal eo bet advabet da c'hoar, peotramant e vefe unan a-douez ho kerent unan du ? Biskoazh n'eo bet du-se, emezout, ne welan displegadur all ebet.

Kinnig a ran ur marc'had dit. Kae d'ar gêr, ha gortoz ken e c'halvo Rico ac'hanout. Dre ret e lakaio un emgav dit evit eskemm an dram gant Loeiza. Diouzhtu e lâri deomp. Met arabat dit reiñ dezhañ da c'houzout emañ ar polis war e seulioù, n'eo ket evit trafik kanab nemetken e vi paket ha keroc'h e kousto dit.

Pa 'z eas ar paotr er-maez eus ar c'homiserdi e oa noz anezhi. Roet e oa bet gant ur barner an aotre da selaou e linenn delefon. Skrapadeg Loeiza a dalveze kement se.

Da zek eur hanter e oa bet kelc'hiet ar c'harter, an holl ruioù adalek ar boulouard Gambetta, ar ruioù Jules Guesde, Richelieu ha François Rivière, betek ar ru Sant Mark. Furchet e oa bet kement liorz, kement toull du a oa, aterset an dremenidi, rouez d'ar poent-se. En aner. Mont da skeiñ ouzh an dorioù hini ha hini a vefe ret. Ne vefe ket hir a-walc'h an noz evit seurt labour, moarvat.

E korn ar skouar Richet, ur poliser a gavas dezhañ gwelout ur furm deñval, ledet 'dreñv ur bouchad lugustr. Ne oa, siwazh, met ur sac'had lastez bet kaset aze gant ur c'hi marteze.

– Re voas out da sellout ouzh les Experts, a c’hoapaas unan eus e skipailh. Ral a-walc’h vefe deomp kavout ur c’horf e korn ul liorz-hêr.

– Ha perak ‘ta, mar plij ? a c’houlennas egile, feuket.

– Peogwir emañ Brest e bord ar mor ! Brasañ kuzhiadell ar bed.

– Alo !

– Ganit emañ ?

Respont ebet digant Alban.

– Ganit emañ pe get ? Arabat dit kontañ krakoù, a-hend-all...

– A-hend-all, petra ?

– A-hend-all, gant da c’hoarig e rin ‘vel gant an hini gozh. Un toull en dour, plouf ha trawalc’h !

Gwasket e oa gorzailhenn Alban gant an trubuilh hag ar from pa respontas.

– Petra az peus graet ? Sot out !

Rico a gendalc’has, kounnaret.

– Te ‘gav dit e c’hellez laerezh va zraoù ha chom digastiz ? Hag ober goap ouzhin ouzhpenn ? Ya bountet ‘m eus ar c’hast kozh-se en dour, evel-se on bet veñjet. Ur gentel dit-te ivez. Un hantereur a roan dit, ha goude-se, kenavo c’hoarig. Domaj e vefe, plijus eo ar baotrez-se.

\*

Dek eur noz e oa e Combani. Huanadiñ a reas Mounissa. Poent dezhi serriñ he levr matematik, ha renkañ he c'haier. Graet e oa he diviz ganti, ha biskoazh ne ziskrogfe dioutañ. Warc'hoazh evit an arnodenn e vefe an hini gentañ er c'hlas. He raktresoù evit an nav miz da zont ne vefent ket dougen ur bugel, pe klask ur gwaz. Nann ! He bak he defe gant ar meneg, evit digoll an holl eurvezhioù bet o labourat, azezet en trepas evit ma kouskfe c'hwek he nizezed er gambr e ranne ganto. Ne zimezfe ket, ha mat pell 'zo !!!

\*

– Ha kaoc'h, a c'hrozmolas Alfoñs. Ar gwellañ plasoù a vez tapet gant ar vugale-se !

War ar c'hwec'h bank a oa el liorzh Jean Le Gall, tri anezho, er gwellañ plasoù, a oa aloubet dija gant tri c'houblad yaouank-tre, diseblant diouzh ar peurrest eus ar bed.

Ar retredad a yeas neuze war ur bank all, tud warnañ dija, tost d'ar porrastell.

A-daol-trumm e estlammas ar plac'h a oa e penn all ar bank :

– Sell 'ta, Kevin ! Gouloù zo en iliz.

E zremm kuzhet e gouzoug e vignonez, ar C'hevin a zrailhas ur respont bennak. An hini kozh eo a respontas.

– Ar wirionez zo ganeoc'h, dimezell. Gouloù zo du-hont. Met n'eo ket en iliz, en ur batis kozh bet d'ar skouted eo.

Sioulaet gant an displegadenn, ar plac'h yaouank ne chomas ket da brederiañ.

Alfoñs, eñ, a reas ! O klask kleuziañ an douar e foñs an dachenn e oa e gi Murphy, bec'h gantañ. Blinkañ a reas c'hoazh ar gouloù a-frapadoù dre brenestri ar batis, ha mougañ. Gervel a reas Alfoñs e gi. War ur c'henavo, hep respont ebet digant ar re yaouank, ez eas ar mestr hag ar c'hi kuit.

« Ha petra a c'hallin ober muioc'h , a glaskas gouzout Loeiza. Esaet 'm eus ober sinoù gant ar gouloù, ha ken buan all n'en deus den ebet gwelet seurt.» Deuet e oa da soñj dezhi ar c'hentelioù tekno he doa bet warlene, pa oa bet roet dezho ul lizherenneg mors gant ar c'helenner, un Elzasad dedennet gant ar radio. Pep hini en doa da zibab ur ger ha da zigejañ anezhañ gant ul lamp pe a-daolioù kreion war an daol. D'ar re all da zivinout. Ne oa ket droed d'ober na gant an « S. O. S » brudet-kaer na gant o anv-bihan. Nag a drouz a oa bet er gentel-se !

N'eus forzh, chomet e oa trawalc'h en he memor, diouzhtu hag aet er-maez paotr e gabuchenn, evit aozañ an teir lizherenn ken brudet (tri sked hir, tri berr, tri hir : SOS).

Adskourret e oa bet an telefon gant Rico. Alban ne ouie dare petra ober : chom hep mont a dalvezfe kondaoniñ Loeiza. Ar plac'hig-se ne oa kaoz da netra. Re gurius un tamm, tra ken. Gervel ar polis, evel ma oa bet gourc'hemennet en ober? Ne oa ket troet da sentiñ ouzh urzhioù ar polis, met ret e oa dezhañ soñjal en e c'hoar, hag en e groc'hen dezhañ. Biskoazh ne ziskrogfe Rico dioutañ, lazhañ anezhañ a rafe kentoc'h.

Adkemer a reas an telefon.

Setu ar pej o labourat. Paket Rico ennañ.

Ar grizilhonoù en-dro d'e zaouarn, un hanter dousennad poliserien en-dro dezhañ, ar skrafer a oa stank ar c'hunujenoù en e c'henoù d'an hini en doa flatret anezhañ.

– Lazhañ ac'hanout a rin, a yude. Ha da c'hoar, n'eo ket me a sikouro da gavout anezhi.

– N'eus ket ezhomm ac'hanoc'h, a skoas ur poliser, o paouez en em gavout gant ar strollad. Dirazañ e oa ur skeudenn vihan didrouz.

– Lâr din 'ta, Loeiza. Anavezout a rez an istrogell-se ivez ?

En he c'hichen e oa tad Loeiza. Merket oa e fas gant an anken bet añduret , met war echuiñ e oa ar gwallhunvre. Pozañ a reas e zorn war skoaz e verc'h evit dinec'hiñ anezhi. Rico a droas a-daol-trumm, badaouet. E gabell a dennas war-dreñv.

– Penaos ho peus kavet anezhi? a c'houlennas.

– Dre forzh atersiñ an dud er ru, klevet hon eus un draig talvoudus. Ur c'houblad tud yaouank o deus lâret o doa gwelet gouloù dindan iliz Sant Paol. Hag un den kozh en deus pellgomzet ivez d'an ti-polis. Ne oa ken 'met gwiriañ a-belec'h e teue ar gouloù-se.

– C'hoariet em eus gant an afell gant ar spi e vefe gwelet. Chañs 'm eus bet ! a lâras Loeiza.

– Hag ar paotr yaouank-mañ, a c'houlennas an enseller, gwelet ' poa anezhañ dija ?

– Kuzhat a rae e fas 'dreñv e skerb. Ne welen netra, pe dost. Nemet ur wech, p'en doa astennet boued din. Riklet e oa e gabell, 'vel damaik, hag em boa gwelet anezhi.

– Petra az poa gwelet ?

– Ba, e guchenn blev glas !

– Ma 'z afemp d'ar gêr bremañ, a lâras Loeiza d'he zad. Skuizh on. Dit da c'houzout, a daolas en ur dremen dirak Rico, merc'h nemeti on !

– Ma 'z pije gwelet penn Rico, a gontas Henaff d'e eiler. Peadra da zirollañ da c'hoarzhin. O klask

ober e renkoù e oa, ha miret outañ da ober gant tud kozh pe bugale. Gant enrolladur e bennad-kaoz gant Alban ha testeni Loeiza eo paket hor mignon Rico, ha paket mat !

Echu ar vakañsoù. An amzer a dro buan, a lâre dezhi e gerent, pep hini d'e dro. Mari a baree brav. An tammou torret a oa bet fichet ha bale a rae dija el liorzhec'h-unan, harpet war ur vazh nemet-ken.

Er sizhun war-lerc'h an darvoudoù he doa bet Loeiza ur bellgomzadenn digant Suzon. Mont a rafe neuze da welet anezhi d'ar Merc'her goude lein.

– Ret eo din diskouez un dra bennak dit, a lâras Suzon. A-benn nebeut e vi aet kuit, reizh eo dit gouzout fin an istor.

'Vel boaz he doa preparet kouignoù, hag ur banne chokolad tomm. Loeiza a azezas en he c'hegin ruz ha gwenn ken brav, a wele marteze evit ar wech diwezhañ.





Suzon a astennas ul lizher dezhi.

« *Ma Suzon garet*

*N'on ket bet onest-tre ganit, ha moarvat e vi dipitet  
pa lenni al lizher-mañ, met pa vo roet dit gant an  
noter, ne vin ket ez kichen ken.*

*N'em eus netra da guzhat ouzhit bremañ. Fellout a rae din ivez ober ur souezhenn da Fouad ha Mounissa : advabañ anezho. Daoust ma vefent buanik en o oad gour e vez posubl en ober. Gouzout a raen e vefes laouen evit kaout an hanter nemetken eus ma madoù, n'eo ket diabeg ma 'z out ma mignonez a-viskoazh. Nemet an dra-mañ : padet re o deus an traoù. Dielloù Komorez zo bet deuet bloavezhioù 'zo, hag ar Velestradurezh zo difonn spontus. Amzer am boa, a soñjen. Mounissa ne oa 'met pemzek vloaz pa oan aet kuit eus Mayotte. Un diviz disheñvel eo bet hini ma flanedenn. Tri bloaz hanter 'zo, en deus ar c'hleñved graet e annez em c'horf. Bep taol pa lâren dit ez aen da veajiñ, ez aen da vezañ prederiet. Digarez ac'hanon, ma n'em eus ket lâret ar wirionez dit, eo abalamour e vije bet krignet ma startijenn gant da druez. Reiñ da grediñ e oan yac'h, sed 'pezh a vire ouzhin da gouezhañ en dizesper. Ken madelezhus out, Suzon.*

*Ma holl nerzh implijet da stourm ouzh al loustonise a bake ac'hanon, 'm eus laosket ma difraeoù ha ma fromesaoù a-gostez. Fouad en deus kollet pasianted. N'em boa ket kalon da reiñ resisadurioù ; n'em eus ket skrivet dezhañ ken.*

*Setu, ma Suzon. Spi am eus e vi eürus en ti, te hag a blij dit al lec'hioù bras. Ra ma tegaso soñj dit eus hor mignoniezh a-viskoazh. Te a zivizo evit ar peurrest !*

*Helen. »*

– Ha petra ‘peus divizet, Suzon ?

– Ma oa bet raktres Helen sikour Fouad ha Mounissa, advabañ anezho, ne fell ket din chom hep ober ar memes tra. Da gentañ e roin dezho arc’hant evit o studioù. War-lerc’h ‘vo gwelet.

Setu e voe tamallet marv an doktorez Arzel da Rico. An enklask oa echu. Betek penn e oa chomet he sekred gant Helen.

Teir sizhun diwezhatoc’h e tigoras Loeiza dor vras houarnet he ranndi e Combani. Redek a reas da stagañ he gwele-skourr. E godell he sac’h e oa ul lizher gant Suzon a roas da Nakchami, a roas da Naïma ha roas da v/Mounissa e karr-boutin al lise. E sac’h Loeiza ivez e oa div spilhenn geltiek, unan evit Fanny, eben evit Nakchami. He div vignonez amañ. Annwenn he doa bet unan heñvel, du-hont e Kleden-Poc’her.

Peurvoulet e-ti Ouestelio, 29200 Brest  
Disklêriet hervez lezenn e miz Here 2019